

Rummen 21. — Bloavez 2

Miz Du 1905.

AR VRO

KELAOUENGELC'H

MIZIEK

KROUET EVIT BEZA

EUN **ERE**
ETRE

AR VRETONED



*Señ an heol avar. savet
Kag. tiruill war Druiz-hol
Ealdiz*



Priz eur Rummen :

5 GWENNEK

KOUMANANCHOU :

Breiz ha Bro-C'hall : 14 real

Breiz-Veur ha lec'hioù-all : 20 real

En Gwerz en holl Stalioù Leorioù gwir vreton

*L. de Guvenc
1905*

KRENNAD :

Darn euz an oberou
priziet en Kendalc'h
1905.

Gorsedd Barzed Breiz
L. HERRIEU

Prezegen
KLAODA

Me gar ma Bro
GOUENNER

D'am Dousik
LAOUIC

AR VRO

Penn-Rener :

FANCH JAFFRENOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »

Tennet deuz Aliou mad Sant KADO

(Myvrian Archeology, levr. III., d. 40, rimel, 3.)

KRENNAD :

Diou varzoniez

G. MILIN

Suzik

AR MAY

Franseza

PRONOST

Jelvestrik, tragediën

AN ARCHANTEK

Efflam Kerzenan

HENORET

Skeuden Richemont,

etc.

Eun neubeud euz ar Skridou bet prizioù d'ezo en Kendalc'h Kastell-Paol

Kenskrivadek Gwenc'hlan

N^o 1

VA MIGNONEZ KER FRANSESA,

Klevet ha peuz ac'hanon o lavaret aliez : Breiz, ô va bro !
me da garo atao, setu perak em lizer a hirio am m'eus sonjet
diskouez d'it pegement a rezon am m'euz o lavaret ar ge-
riou-ze.

Eur sell hepken diwar c'horre war hor bro a zo awoalc'h
evit karga hor c'halon a joa hag ivez a garantez gwirion evithi,
petra eta ne d'eo ket ar joa, ar garantez-ze, pa seller pisoc'h
euz e maeziou, euz e histor, euz e iez, pa bouezer peb tra a
dost ? — Braz eo a dra zur, mez ouspenn an dra-ze, roi a ra
deomp nerz, startaat a ra hor bolontez da vlegant henor war
roudou hon tud koz, ken kalounek ! ha goude eun examin
aketuz war Breiz e lavarfemp : Ne vo diframmet hor gwiska-
mant hag hor langach diganeomp nemed gant hor c'halon.

Va mignonez ker, te a zo test d'in da lavaret penoz, ar
Franz heb Breiz a golfe kalz euz e gened, rag guelec a peuz
evel d'on, kredabl, tud o evesaat e brasder ken kaer.

Ia, war bord ar mor, er prat, er c'hoat evel er menez, e
peb leac'h e santer ez eo eur vro dibabet. Dirag ar goagennou
kounaret hag eonnenez euz ar mor, a venn drailla eur girlan-
tezen sonn hag huel a reic'her, dirag ar foenn druz lusket
goustad gant ann avel ha laouenneat gant kanik ar richer kor-
gammet, dirag ar bruk euz ar granguienn e kichenn pennou
ed alaouret, dirag ann touriou dantelezet, ar c'hroasiou mein,
ann oabl glas, ann heol laouen, dirag kement-se oll, neketa
Fransesa, eur joa doun, interior meurbet, a c'houniz hor c'halon.
buan e teu war hor muzellou ar goulenn-ma : « Piou, pe seurt
pobl eo eta perc'hen eur vro ken kaer ? — Raktal e c'heller
hon respont : Eur bobl eo, dign eus e c'harter. »

E gwirionez, ar pez a velomp er vro hen lavar deomp me-
mez. Enn eur vale dreizhi e kaver stank ilizou, chape-
liou, kastellou koz, raktal e veler ez eo Breiziz tud a feiz,
tud a zever ha tud a galon ivez ; enn eur ger eur bobl hag a
zo dreist peb pobl.

Sioul, enn eur vali gwez bras o voudal, evel ar re a peuz
gwelet ken aliez enn dro d'ar maneriou e Breiz, va spered
neuz a dreuz d'an daoulam ar c'hantvejou hag e leac'h ma
teu brema al labous mor da ziskuiza, me a zeblant gwelet
eun dijentil breizad, e gonsail sekret enn dro dezhan, o resoli
eunn dra grevus, mez kaer, mez braz, nerzus ha kalounek ;
hano z'euz da zifen ar feiz, an henor, rag er Palestin e ma ann
dristidigez vraz, eur bobl kriz ha digalon o deus kemeret bez
hor Zalver benniget ; d'ar c'helou ankeniuz-ze kalon ann dijentil
enn deus lammet ha

Benn eunn neubeud goude, kaer e vije da velet
Porz maneriou Breiziz leun a zuchentiled
Pep kroaz ruz war ho skoaz, pep marc'h braz, pep banniel
Evit klask ann aotrou da vonet d'ar brezel

Gwechall Breiz enn deuz great e dever, brema er gra atao.
Abaoue allianz hon dukez Anna gant Louis XII enn deus roet
ivez evit difen ar Franz e faotred iaouank, e mipien, ar sou-
dardet kalounek ha nerzus-ze pere o deus gouezet lakaat
banniel ar Franz da lintra a sked war an tachennou brezel ha
memez pa z'eo bet red, skuillet o deus ho goad evithi. Na
d'eo ket paour a dud brudet ken neubeut ; etouez mil all ne
hanvin d'it nemet Duguesclin, pehini ma c'houie manea
ann armou, a c'houie gwelloc'h c'hoaz beza karantezus. Lavar-
ret a rer penoz e ingalaz tout e ranson d'ar beorien var hent
Bourdell hag e roaz d'ar Prins Du a Saoz eur merkl euz hon

largentez enn eur lavaret : « Ne zeuz maouez e Breiz ha ne
nezfe eur gegillad lin evit paea ranson ann aotrou Duguesclin. »

Va mignonez Fransesa, ha lavar d'in ha n'eo ket eunn
dever evidomp derc'hel da iez ha da wiskamant eur bobl
ken dispar ? — Eo, eunn dever eo ha mar n'er greomp ket e
tishenoromp hor bro pehini a zebelifemp er baourentez ; hon
armazedou respetet e peb leac'h e tishenor'femp ivez, rag an
armazedou-ze a ziskouez da bep hini he zever : « Kentoc'h
mervel eget enn em stlabeza ; » Hogen o tilezer hor iez, hor
gwiskamant, a ve tamall Breiz e gaou dre hon oberou.

Va mignonez ker, ne meuz aoun ebed o lavaret, an hini a
zeufe da ruzia euz e iez, euz e wiskamant, hennez enn deuz
eur spered enk ha striz, eur volontez goag, enn eur ger ne
d'eo ket enno den a galon ha ne verit ket ann hano a vreizad ;
ene hennez ne d'eo ket iac'h a dra-zur, rak klenved ar respet-
hunen a zo speget enn'han hag e ranker beza plad evel eur
billig evit kement-se.

Penoz : ruzia euz eur iez ker iac'h, a lavar ken mad ar pez
a sant ar galon, euz ar brezonek pehini n'eo bet saotret morse
na gant heresi, na gant blasphem, pehini n'hen deuz servi-
chet enn eur ger nemed evit embann Jezus-Krist ? Ruzia euz
hor gwiskamant ! Ken modest, ken deread ha ken kaer ; karter
ebed n'hen deus evel Breiz ann eurvad da gaout kement a
seurt gwiskamanchoù hag a roffe kement a c'hened d'an den ;
e c'hoeffou brodet, e dillad goarnisset gant voulos ha per-
lez a ro da bep hini eun ear a roue hag a rouanez.

Eur lodenn eus bourc'hisien kear o deus ar viloni da daga
ar brezonek, hor gwiskamant, fallout a ra dezho ho mouga,
ho flastra, ho distruja war digarez lavaret deomp hon deus
gaou o terc'hel d'hor c'hilz koz, ema brema kantved ar progres
ha digareziou fall evelse. Trubardet ne z'int ken ha kredi
anezho a ve enn em drompla hon unan ; eun, dispont, kasomp
anezho da bourmen diwar hon tro, rag ne glaskint ken kuzel
gouenn ar Vretoued, ha rivina hor bro. Ar c'houraj da gen-
derc'hel war roudou hon tadou, ha da senti euz hor santimant,
hor gounezou memez istim ann dud hon droug-prezek e gaou.

Evidon, me a zalc'ho d'am brezonek, d'am gwiskamant
daoust ar pez a vezo lavaret ha n'eo ket evit plijout d'an
tokou kern huel e z'in ken neubeut da lakaat va c'hoeff war
beder vleven.

Te ivez, a esperan, a rei evel d'on, Fransesa, hag enn em
henori a ran da gaout eur vignonez evel d'out, leun a dan
evit Breiz.

Esper am eus pa z'in da velet ac'hanout enn da di soul,
e leac'h ma chourgan al labous, ker brao hag er brouskoadik,
da gaout ac'hanout a lavaran atao gwir vreizadez.

Da vignonez pehini a bed ac'hanout da jom atao e muia
karet.

GLAZARDIK AR BOD DERO.

N^o 2

Kererven, ebrel 1905.

ANTON, VA C'HAMARAD KER,

Pell zo he peuz kuitet da vro. Koun braz e meuz ouz ar
zulvez out deuet da Gererven evit lavarout ar c'henavo d'az
kamarad skol hag abaoue e sonjan ennout. Ha va sonjans zo
trist. Rag 'n em goulenn ran atao perag out te eat da goll e
Pariz. Marteze evit ober egis da genvroidi ? Mez sell ar pez
zo erruet ganto. An darnvuia euz ar re o deuz kuitet evel-
d'out ti o zadou, a zo, pe enn dienez, hag an dienez a vleu
buhann var bankou ar varn, pe varo en hospitaliou. Ar re a
zistro, paket gant klenved ar vro, zo leun a geuz holl o
buez. Distrei a reont paouroc'h eget da vont, ar goad breizad
n'e mui anavezet enno, ar c'hlenvadur hag an dinerzed a

zo krog. Ne c'hellont mui, gwasoc'h zo, mez o deuz da zou-genn troad an arar.

Martreze c'hoaz out te eat evit tec'hout diouz al labour, abalamour e zeo paduz ha c'houero? O, nan, ne gredan ket kement-se. Re galounek edoz!

Martreze ive out te nijet abalamour oa bet meulet d'id Pariz, e pehini an dud a c'hounez aour, e pehini zo traou spountuz, Pariz ar c'haëra bro euz ar bed-holl? Mond a ranker e Pariz evit gouzout eun dra bennag? Traou faoz, va Anton. Pell awalc'h oun outhi evit gouzout ar wirionez, evit gouzout euz bet goape! d'id. Koulskoude e choumez a enep kuzuliou ar re a zo bet paket 'veldout gwechall.

Beraat da amzer-enn ifern braz Pariz, e pehini ne c'houezez nemet glaou ha traou fall, e pehini ne baki ket an eürusted. Kerkoulz hen lavaret, distro, va Anton, evit echui glac'har da dud koz, glac'har da vamm geaz ha da dad nec'het. Mall o deuz d'az kuélet; ha lavaret hon deuz ar wech diveza oun me eat da Germeur, aoun o deuz evit o honor, abalamour te ar c'henta euz o famill en deuz kuitet e vro, e gerent, e zeve.

Anaout a ran eo poaniuz ar vuez en Breiz-Izel, er barrez; ar paeou n'int ket braz, kalz a dud zo, ha ma vije neubeutoc'h, muioc'h a vije, martreze, a dud eüruz. Mez ive, pa ze brasoc'h ar hoan, ha bihanoc'h an digell, brasoc'h an dalvoudegez.

Ha c'hoaz, ker mad eo beva e kichenn ar c'herent, ar vignoned, ar c'hamaraded! Sur oun ne gavi ket en da Benn-Kear, ken braz, ken leal karantez hag aman. Biken Pariz n'euz talet ha na dalo bro Breiz-Izel.

En houman nentra pinvidik, mez e leac'h, gwelloc'h. Biken bro zo bet. a zo c'hoaz ken brao hag hon hini. Fougez oun outhi ha te a dle beza ive. Tud koz a Vreiz, ar Vreizaded fur, ar varzed! Sonj e peuz ouz ar pez a lavare deomp bemde persoun koz ar barrez: « O Breiz-Izel, ô kaëra bro, koat enn he c'hreiz, mor enn he zro. » Dalec'h koun ouz an deziou pa redez ganemp e tresek ar bruk hag al lann pa ganemp soniou enn eur derc'hell ar saout. E nebleac'h ne gavi eun ear ken neat, eur meaz ken brao, ken didrabaz, ken dister, ken kaër meurbed enn he zisteradurez.

E nebleac'h all ne weli koajou war here euz bet kontet historiou burzudus evel war hon re. E nebleac'h, e Pariz me-me, ne weli tud ken mad, ken honest, hag ar Vretoned pa enebont ouz o nammou.

Ha pa gomzan ouz nammou da genvroïdi, laosk da lavaret d'id ne c'helli ket beva e Pariz heb paka nammou, kazusoc'h ha mezusoc'h eged hon re. Tost oun da gredi, var ar marc'had, e peuz hirio ankounac'het tradisionnou da vro. Ha ne peuz te ket bet kalonad enn eur dilezel buez an tiek, enn eur dremenn da unan nevez flamm. Mervel a raffenn ma vije red d'in dilezel ar pardonioù, chom heb eva boladennou chistr, kana soniou ar varzed, ha ped a dra all!

Mez, ne mije ket awalc'h a amzer, ma rankfen lavarout d'id ar pez holl a zonjan. Re hir vije va lizer, ha re drist ive.

Ha c'hoaz, abalamour e skrivan e brezounek, ne pije ket ar pasiantet d'he lenn penn da benn. Koulskoude, gant goustianz e skrivan evelse. Gwelloc'h e meuz kavet lesker ar gallek evit kaout ereedigez ganit e brezounek. Sioulloc'h eo d'am c'haloun! Sonjet e meuz e pije plijadur, rag ne dleez mui kaozeal iez da iaouankiz. Desket mad out bet enghi, epad pell amzer ne p'euz gouezet nemethi; ha me, da gamarad skol, meuz touef n'hen dilaoskfenn ket. Joa braz e rafez d'in, ma lavarfez ne p'euz ket c'hoaz he ankounac'het.

Ken flour, ken barzadus, ken koz, ha ken doujus eo iez Breiz-Izel! Doujus 'vel an traou koz. E garout e ran bemdez muioc'h mui. Perag ne garfez ket hi? Ne ket dei e dal he gloar hon Breiz? Ne ket hi he deuz e c'hanet? Ne ket enghi e vez kontet marvailloù, kontadennou « plijadur hon zud koz », sonniou, gwerziou a rea burzud Breiz-Izel? Outhi e peuz klevet lavarout gwechall:

« Iez hon tadou, o iez karet
Iez ar varzed koz a wechall
Te eo iez kaër hon zent koz
A gomzont c'hoaz er Baradoz. »

Ne varvo ket araok pell, Anton! Ha ma vije bet er barrez er miz diveza e pije gwelet enn deuz nerz c'hoaz, hon iez koz. Eun histor brezounek zo bet c'hoariet war eun teatr. Aze ne pije klevet tam gallek, mez brezounek hebken, hag e pije gwelet gwiskamanchou, evel ma oant gwechall.

Pegen brao e oant enn amzer-ze! Hirio, ni ar botred iaouank pa zeomp e keariou, pe pajoumomp enn hon tiegechou, war ar meaz, kerkoulz lavaret, mez hon euz da zougenn hon gwir gwiskamanchou, ha da gaozeal hon iez! Ha perag kement-se? Gant aoun euzar vouze hoarzin, abalamour 'zeo ann amzer beza bourc'hichennet, abalamour 'z eo ar « mode » ar « progrès » egis ma vez lavaret e gallek. Ha ne zonzomp ket oc'h hen ober, pa ruziomp ouz hon iez hag ouz hon gwiskamanchou, e ruziomp ouz omp-ni hon unan, ouz hon ganedigez, hon kerent, hon bro.

Keid ma raio ar Progrès nemet rei menozioù ken mezus, gwelloc'h hag an dever eo e lesker. Lavarout d'eomp-ni ruzia

ouz hon bro vihan, ouz hon iez, hon gwiskamant? Oc'h hen ober, e kas ac'hanomp, nan war hent an eürusted, mez varlerc'h. Ha c'hoaz, perag e pije te mez gant da vrugou ha da jiletenn, da zae? Tud ar broiou all n'int ket gwisket evel d'omp, koulskoude n'euz ket lavaret d'eo int sod, int tud hag a enep ar Progrès.

Hep dale ne vezo dibabet mui ar Vretoned ouz ar Gallichen. Perag lakat lostou-pik, ha redingotou, ha tokou evel barikennou? Kalz difesonoc'h int eget omp-ni gant ho c'huserechou. Ha perag, evit mont gant ar Progrès, beza gallek ouz an treid beteg ar penn? Ni Bretoned ne c'hellomp ket ober eveltho rag ni zo eur bobl, eur rumm a dud. Ped bobl hen deuz he iez hag he fesoun da veza gwisket? Perag ne rafemp ket ni ec'his ar boblou holl? Pa varvo ar iez hag ar gwiskamanchou enn hon Breiz, ar bobl Breizad a varvo ive.

Ar re o deuz c'hoant d'he welet mervel, eo a gaoze euz ar Progrès. D'eomp-ni, delc'her mad, va Anton. D'eo'c'hui muioc'h, pa zit kuit euz ar vro. C'houi a gommanz an dilez ouz ar vro vihan Breiz-Izel.

Evid'on, Anton, a zalc'hin betek mervel va iez ha va gwiskamant. Ne vankin ket de'o, ha karout a rafenn gouzout ne peuz ket te ho dilezet c'hoaz. Da respount e c'hortozin.

Skriv d'in buhan, va Anton. Mall e mezo da gaout ouz da gelou. Pegeneüruz e vichen ma oesfenn en deuz great mad va lizer d'id, ma teufe ouzit ar c'hoant da nonpaz choum pelloc'h e Pariz da velgri, martreze da vervel. Traou trist e meuz lavaret var va lizer. Evit da vad eo, kamarad ker. Echui a ran war eur beden diveza, peden gallek houman, peden e rankfez ober d'az kenvroïdi kuzet enn toull hanvet Paris:

« Dans l'idiome ancien chaque jour, disons-leur les mots qui font aimer l'Armor.

Portons la veste et le chapeau de nos aïeux
Malgré le rire et les dédains des gens de France.
On nous appellera des arrières, tant mieux,
Car nous retournerons alors vers l'Espérance.

Mez dalc'h sonj diouz ar fin a deu diouz ar c'homzou-man:

« Frère vous m'avez dit : la Bretagne se meurt
Ne désespérons pas, en face de la mort
Si le siècle est mauvais, notre âme est fière et haute
Et s'il arrive un jour que succombe l'Armor
Nous aurons à pleurer nous-mêmes notre faute. »

Breiz da virviken!

Da Gamarad,
LAOUIC AN ERVENNER.

Kenskrivadek Gwerziou

SONJ AR MARO

(Gwerz diveza eur Barz iaouank, savet o c'hortoz ar maro)

Va spered a zo tenval, red eo d'ar Barz mervel:
Gortoz a ran dizale an Ankou d'am gervel!

—o—

An holl a lar d'in-me: « Ar vuez zo digor
Frank dirak da zaoulagad, evel brazder ar mor;
Ar gwad en da wazied a verv hag a entan:
Kuita da zonzou tenval, bez laouen er bed-man!

Sell! Na pegen dudiuz en dro d'id ar bed braz!
Sell! Pegen skeduz a lintr ar bleuniou er prad glaz,
Nag a laboused bemdez a gan en dero koz.
Pa zihunont d'ar mintin, pa gouskont da zer-noz!

Ha n'eo mad d'az kalon koantiri ar menez,
Ha douzder an aveliou fresket gant ar mor-c'houez!
Nag an dudi a gaver dindan ar c'harz tenval,
Pa valeer e-unan 'pad an noziou du-dall? »

—o—

D'al laboused me lavar: « Kanit eur c'han lirzin
Evit va renta laouen eur wech 'rok ma varvin:
Rag ho moueziou a ziver em gouli diremed
'Vel eul louzou diboaniuz ha birvidik meurbed! »

Pa ziskan an ezennou deuz ar menez uhel,
Ha pa zeu d'am drem tenval da flodi an avel,
Ezennou ien ar maro a gredan zeu d'am c'hlask;
Gant an aoun a grenan, va dent kerkent a zrisk.

Ha pa zeu beteg ennon c'houez ar mor deuz a bell,
Me zonz e rankin kuitat hep dale Breiz-Izel,
Ar vro gaër-ze a garan a-dreist pep bro, pep tra!...
Dirag ar mor eonennuz me ziroll da lenva.

Gand an noz pa volean dre hentchou va c'hearik,
Me a zalc'h tost d'ar faziou ha d'ar c'harz sioulik,
Rak trouz sklintr va boutou-koat, o taskei war ar vein
A ra d'in kredi ema 'n Ankou a-drenv va c'hein...

Ha pa 'z ean da voredi d'am gwele kloz, en noz,
Va spered o troidellat na gemer nep repoz,
Beuzet, e sonj ar mintin a zavo evit mad,
E mintinvez an Nenvou, eur vintinvez peurbad...

—o—

Pa vo tec'het va ene diouz va c'horf prenveduz,
Diskennit heman en toull, lakit eur groaz a-uz...
Va lezit e peoc'h goude, da hunvreal er bez,
Ankounac'het da viken war zouar an enkrez!

—o—

Ar Barzik a dremeno evel eur bouill maged,
Mez e werziou vo kanet en Breiz-Izel bepred !.....

AR BARZ DISHANO

Kaërder ha nerz va Bro

Var don : Sao Breiz-Izel, etc.

Bez oud en gwirion eur vro vad dispar
Kaër da welet en da zouar
Plenennou, prajou ha goarennou lann
Koajou braz ha liorzou koant
Menezioù goloet, ha gwez uhel
A gaver ennout, o ma Breiz-Izel !

Va bro gaer enn dro d'id 'vel eur c'houriz
Gwella skoazell 'vid da frankiz
Eman dichadenn, diroll ar mor braz
A ruill herruz e darziou glaz
Pere varv neur valea d'ar rec'hel
'Zifenn da zouar, o ma Breiz-Izel !

Var da zouar Roue braz an nenvou
'Neuz skuillet pinvidigeziou :
Te zoug gwiniz puill 'vel segal ha kerc'h
Hag ed du gwen egiz an erc'h,
Pere, luskellet dre an avel
'Gan da vadelez, o ma Breiz-Izel !

Ennout, bro gaër binniget gant an nenv
A vev eur ouen kaled ha krenv
Pehini 'zalc'h sounn hag uhel he fenn
'Vel e zadou dirak 'n estren !
Ar ouen-dud 'oar stourm beteg mervel
Hounez 'vev ennout, o ma Breiz-Izel !

Ar ouen grenv-ze a dreuz ar c'hantvejou
'Deuz miret d'id gant o c'hiziou
Iez o c'hentadou, Kelted an Arvor
Iac'h ha buek, gant o enor
A laka ken skeduz da vanniel
Ha da Herminik, o ma Breiz-Izel !

Da ouen kalonek o Breiz digabestr
'Bleg 'velato dirak eur Mestr :
En despet d'ar Bed hi a zaoulin c'hoaz
Feal ha t'er ouz skeud ar Groaz !
Kavel burzuduz an dud santel
Out en gwirionez, o ma Breiz-Izel !

H. KERNILIS.

Kenskrivadek Soniou

SON BRUDET AR C'HEMENERIEN



Daou ge - - me-ner deuz La-nergad A zo deut



a-man min-tin mad, A dreuz al lan-nek hag ar prad



Da o-ber eun de - vez gri-at !

- | | |
|---|--|
| <p>I
Daou gemener deuz Lanergad
A zo deut aman mintin mad.
Adreuz al lannek hag ar prad.
D'ober d'eomp eun devez griat.</p> | <p>VI
Sonet teir heur, e Kerlaran.
Setu ar billik war an tan...
Pep a grampoen, pep a zousen.
Zo e kof ar c'hemenerien !</p> |
| <p>II
A hoan ma tigouezont en ti.
E maint o c'houlenn da zibri...
Buan ar skudellad zouben
Zo e kof ar c'hemenerien !</p> | <p>VII
Fanchik a lavar d'e Janed :
« E ler'ema o c'hof, me gred ! »
Janed a respont d'e Fanchik :
« Kofel mad ez int, va goazik ! »</p> |
| <p>III
Fanchik a lavar d'e Janed :
« Ar re-man a zo ker o boued ! »
Janed a respont d'he Fanchik :
« Bouetet e vint, eun devezik ! »</p> | <p>VIII
Sonet pemp heur, e Kerlaran.
Ar podhouarn zo war an tan...
Eun tamm kik sal, eun anduillen
Zo e kof ar c'hemenerien !</p> |
| <p>IV
Sonet dek heur e Kerlaran.
E laker ar iod war an tan...
Leiz ar podhouarn a iod ien
Zo e kof ar c'hemenerien !</p> | <p>IX
Fanchik a lavar d'e Janed :
« Mad e kavont anduillenned ! »
Janed a respont d'e Fanchik :
« Pep kemener a gav mad kik ! »</p> |
| <p>V
Fanchik a lavar d'e Janed :
« Dibri kement-se zo pec'hed ! »
Janed a respont d'e Fanchik :
« Arabad eo lavaret grik ! »</p> | <p>X
« Va c'hredit, ar c'hemenerien
« N'int netra nemed debreerien...
« Fanchik, pakit d'in an alchouez
« Da gerc'hat arc'hant o devez ! »</p> |
| <p>XI
Daou gemener a Lanergad
O deuz great d'eomp eun devez mad
Fardet eur c'hoef hag eur bragou,
Ha 'dreist-holl leuniet o c'hofou !</p> | |

Iouen POULLAN.

KANAOUEN AN EMZIVAD



Bezomp mi - gno-ned la-ouen holl; sel-lit, e-



ma deut ar ma -- re, Dis-ken a ra ban-nou an



heol. Da dom-ma 'n dou - - ar a-dar -- re !

Bezomp, mignoned, laouen holl :
Sellit, ema deut ar mare,
Diskenn a ra bannou an heol
Da domma 'n douar adarre !

Al labouz a gan e zoniou,
Pennfollet gant e garantez.
Kan, labousik, rag ar c'hoajou
A ziston sklintin gand da vouez !

Kreiz ar spern-gwenn bleuniet er c'harz
Skoachet ha koant 'giz eun dudi,
A zo eun neiz, re vihan 'barz,
Digor o beg o klask dibri.

Bokejou tost d'ar wenojenn
A zav o fenn dreist ar ied glaz :
Lod a skuill war dro o c'houezen,
Gant an heol tomm, lod all zo kraz.


O ! Nag eüruz eo an den paour
Pa zeu an hanv war an douar !
Vitan da gaout na ti nag acur,
Pell dioutan dec'h ar glac'har.

Doue a ro d'an emzivad
Kalon dener evit entent
Pegen kaer eo boked ar prad,
Pegen koant eo disheol an heni !

KLOAREK.

AR MINTIN

Goustad.



An noz a dec'h euz an Nenvou, Ar mintin a



bar war ar bed ; Breman skleri - jen ar ste - red


Diskan.



A zo kuzet touez ar c'hoummou. — Bre - to - ned, ka-



nomp a bouez penn ! Bro Vreiz a zi - hun d'ar min-tin.



Bo-ke-dik, di-gor da c'hoar - zin ! La-bou-sed, ka-



net ho pe - dem !

I

An noz a dec'h euz an Nenvou,
Ar mintin a bar war ar bed ;
Breman sklerijen ar stered
A zo kuzet kreiz ar c'hoummou.

DISKAN

Bretoned, kanomp a bouez penn ;
Bro Vreiz a zihun d'ar mintin.
Bokedik, digor da c'hoarzin !
Laboused, kanit ho pedenn !

II

Netra na drouz, nemed gwechou	Ar goueller a sko duze
Ebarz ar gwez eur ganaouen	Dirak ar c'hoel mogeduz ;
A gan eul labousik laouen	E vaill dir a zraill luc'heduz
Tra ma pign an heol en Nenvou.	An houarn raz, war an anne.

III

Ar gliz a zav euz an douar,
Hag a bign warzu ar goabrenn.
Er park tosta zo daou ejenn
O kas penn da benn an alar.

IV

Setu ar wenenen vihan
Alaouret 'vel eur bokedik,
War diouaskell an ezennik,
Da glask he mel a nij buan.

V

Me wel duze deavedigou
War ar prajeier o peuri ;
Ha pelloc'h duze o c'hoari
Eun toulladik bugaligou.

VI

Kaer eo an deiz, savomp breman
War zu an Nenv hor pedennou !
Meulomp hon Tad zo en Nenvou
Da veza roet d'emp an deiz-man.

VIII

Kaer eo hor Bro da c'houlou-de,
Kaer eo hor Breiz da bep mare,
Kavet he gened koz arre,
Ha ka'rat c'hoaz e ra bemde !

IOUEN POUILLAN.

AR BARIZIANEZ

War don : Ar Pillaouer hiraet.

En hon Bro Breiz eman ar c'hiz
Gand eur rum merc'hed iaouank
Da voned hirie da Bariz
Da glask madou, bue frank ;
C'hoant e deuz da vezan mitez
Dindan an holl er c'herio...

DISKAN

Foei, foei, foei d'ar Barizianez,
A ra mez da dud he Bro !

Gonid bara en Breiz-Izel
Ar plac'h iaouank na c'houll ken ;
En he fenn a zo deut avel :
— « Tro, emci d'ar skubelen ! »
Setu hi o tec'hel hep mez
Pell deuz he zud en daëro...

Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

Ma c'houlfe an dud diganti
Pelec'h ec'h a ken diskwiz,
Hi a larfe hep he fedi :
— « Me ac'h a da Ba-a-riz ! »
Ha neuze d'ar c'henaouegez
Peb den dre fent a laro :
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

Pa vo pellaet deuz he Breiz
Hag en Pariz dizanve,
Al labouriou kaled, direiz,
Eviti a vo mad tre ;
Evel eul loen hed he devez
Hep paouez hi a boanio...
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

Koll e rei ebarz ar gêr vraz
He zammik nerz, he iec'hed
Ha pez eo ar gwasan, siouaz !
He furnez hag he gened ;
Ne viro deuz ar Vretonez
Netra nemed an hano !
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

Ma tigoue d'ezhi doud en dro,
Goude vo bet en Pariz,
Neuze hi vo eur plac'h faro
Eun dimezel deuz ar c'hiz ;
Gwisket vo 'vel eur Rouanez,
'Vo ken anveet 'n he Bro !
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

War he fenn, evel eur sparfel,
Vo gwintet eun tok re vraz
Ma laro outan an avel :
— « Heman zo prest da vont c'hoaz !... »
Leun vo ar plac'h a lore'h, a c'houez,
Deuz lein he fenn, d'he boto !
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
Ar ra mez da dud he Bro !

Dilezet 'vo ar brezonek,
Ankouaet e vo ganti ;
Distaga e rei en gallek :
— « Oh ! lê, lê, j'viens de Pêris !... »
Eur vez vo gweled ar plac'h kez
Gand he stum hag he ardo...
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

Da bep tra ebarz Breiz-Izel
Hi a gavo e dam si,
N'he devo ouz bro he c'havel
Nemed droug ha kasoni ;
Er gêr hi a vezo diez,
Red vo d'ei mond c'hoaz en dro !
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

Ar plac'h man n'eo ken Bretonez
Baz he bro he deuz nac'het,
Bazan eo, eur Barizianez !!
Ha piou an ije sonjet ?
— Huchomp holl eta en eur vouez
Warni a-bouez hon fenno :
Foei, foei, foei, d'ar Barizianez
A ra mez da dud he Bro !

AR YEODET

Son an Hiviz

Daoust d'ei da veañ skwiz-brevet
Ha da grenan gant an derjen,
Ar paour kez maouez morlivet
A jech, a jech war he neuden,
Ha 'n eur gas he nadoz en dro
Gant he glazio garv e tiviz,
En-kreiz huanad ha daero
O kanan son trist an hiviz.

Arog ma par 'r verelaouen,
En dro, en dro, nadoz vihan ;
Pa na glever 'med ar gaouen
En dro c'hoaz, en dro heb chan ;
En dro, en dro, ken e vin meo ;
Ken e kouezin dizec'het tre
War 'r boutonigo gwenn 'vel reo
A beustagin barz em huvre

O groage hag ho peuz goazed,
Merc'hed iaouank beo c'hoaz ho mamm,
Nan, n'eo ket lien ec'h uzet
Mez bueo peorien dinam...
En naon hag er baourante gri,
En dro, en dro, ma nadoz skanv,
Ha koulz hag eun hiviz, gwiri
Gant neud kordet eul linsel ganv.

Mez perag komz euz an Anko
Spont peurbadus da gement den ?
Ma-un, na ran forz piou e sko
Ha na grenan 'rad e skeuden :
Ouz-on eo ken henvel ha tra
Ha gantan 'renkin mont timad...
O ! perag eo ken ker 'r bara
Hag ar goad tud ken marc'had-mad ?

En dro, en dro, nadoz mibin !
Pegouls 'vo achu ma loden ?
Ha pe dra vad a deuo d'in ?...
Truillo brein war ma chouk hepken,
Bara brenn ha mann dindan meud,
Eur gwele plouz, mogerio noaz...
Kammed mignon nemed ma skeud
D'am zikour da zougen ma c'hroaz !...

Eun heur diskwiz ! eun heur hepken !...
Nan 'vit tanva ar Garantie,
Mez 'vit chelaou mouez an anken,
Kement gouela am zivec'he !...
Laz ! em daoulagad a-ratoz
Eo gwelloc'h d'in stankan an dour :
Peb taken 'zilerc'h ma nadoz
Ha gwaz ma saotrfe ma labour !»

Daoust d'ei da veañ skwiz-brevet
Ha da grenan gant an derjen,
Ar paour kez maouez morlivet
A jech, a jech war he neuden,
Ha 'n eur gas he nadoz en dro
Gant he glazio garv e tiviz,
En kreiz huanad ha daero
O kanan son trist an hiviz.

JAN NADEN

Gorsedd Barhed Gouriniz Breih-Izel, eit er ble 1905

Er guir eneb d'er bed. Er ble men hoah e ma bet red d'er Varhed mont eneb d'er bed. Choejet hur boe ul leh kaër aveit gober er Gorsedd, mer pieuour en tachad se neu des chet faller dehon hur lezel de vont ar e zoar meit mar vehe bet reit pemp kant skouid dehon ! Peur-keh bobion !

Pel e vemb hoah merhat erauk ma vou konprennet mat er peh e fal d'emb gober ha ma vou sellet doh hun tolpeu get an doujans hag er respet e zou deliet d'ol er peh e zou merk karante un nebed tud gredus e kever ou

gouen. Deustou d'en hoarhereh neoah, deustou de hoar-pereh en dud e garehe mougein hun brediah ha miret azoh omb a gerhet en hent merchet d'emb get er varhed koh, d'er 14 a viz Guenholon 1905, hun es hum dolpet ar Gouriniz Perharidy, tost de Rosko eit gober hun Gorsedd bleadek.

Troieü peder er, goude en devout merennet ha kanet un nebed sonenneu d'en diavezerion dastumet en hostaleri, er Varhed e gemer hent ke Roskov. Inou e iant e diù vag heliet get tud aral, kandallherion pe diavezerion hag en des hoant de huelet er gouil.

Er morizion e saü er gouilleu hag en aüel e bous er vageu trema er gouriniz. Haval omb bremen doh er Vreihiz ag en amzer gueharal, boutet er mez ag ou bro get er Sauzon hag e ze de Vreih-Izel de glask ur vro aral emen ou dehe gellet biuein didrouz ha divrezel. Er sonenneu kaeran e saü neze ag er vageu hag e ia ar en aüel bet er rehier du streüet e pleg-mor Rosko. En dason e gresk hoah hun boehieu ha hun girieu e ia else de laret d'er Roskoiz dastumet ar er he penaus nen de ket koah marü gouen er Helted.

Epad en amzer se er vageu e drouh perpet en deur glas ; chetu ni arriü ar aud er gouriniz. Dichen e zou dies rak amen nen des ke erbet hag en houlenneü e vransel hun bageu el ma hrehent de glorad keneu. Get eleih a boen e pigner ar lein er roh e zou choejet eit bout er leh-lid.

En diavezerion hum den un tamig a goste epad men de er Varhed e huskein ou seieu. En Drouiz Alc'houeder Treger e verk, get brocheu kouivr, er heri sakret e pehani hum d'olp er Varhed eit gober ou lideu.

Chetu kampennet pep tra. En Drouized gusket get seieu gwen, er Varhed get seieu glaz, hag en ovated get seieu guer hum lak unan arlerh en al hag e bign trema er heri, Ab Alor (Barh Korner) ketan, hag ar elerh Mab an Argoat (Barh Sonner), Er Barh Labourer (Douger en ihuelvar), Telen Aour (Douger er glean) Eynik Arvor (douger baniel Breiz), Karevro (douger baniel er Gorsedd), Er Barh Melen (Douger er horn de lvet), Ab Sullio (douger baniel *Ti Kanerion Breih*), Taldir (Barh embannour) ; an ovated deu ha deu, en Drouized Alc'houeder Treger hag Abherve hag eit klozein er prehesion, er re e houlen bout digemeret er Gorsedd. Kan e brant ur poz kan d'en dolmen ha peb unan e gemer e leh ar lein er roh.

Er lideu e gommans neze dirak en diavezerion souehet. Chonjet e oent de huelet treu dejannus ha de hoarhet ha chetu ne gleüant nameit konzeu fur. Oi e konprennant penaus er Varhed e zou dirak te nen diat ket inou el ma zou laret dehe, eit farsal, mes eit inourien en amzer tremenet ha merchein d'er Vreihiz en hent ag en amzer de zonet. Oi e huelant eue penaus er Varhed ne glaskant ket seüel ul lezen neüe, mes penaus e mant el er Sent koh en des groeit Breih-Izel, apostoloded *karante er vro*, apostoloded *karante er iez*, en ur gir apostoloded er garanteieu e zou rekis eit gober ur gurunen a inour d'ur garante aral ihuelloh : Karante Doue. Ar Velion e zou apostoloded Lezen Doue, er Varhed e zou apostoloded Spered er Gouen.

Chetu er peh en des laret en de ze en ou divizeu gredus Alc'houeder Treger, Er Barh Labourer, Ab Alor, Taldir, Even ha reral.

Abherve, ean, en des reit alieu mat d'er Varhed neüe. Laret en des dehe e teliant dihuen hemb arsaü er spered keltiek hag e zeli bout eit ol er Vreihiz, heaul er Huirione.

Goude el lideu e hes bet digemeret izili neüe er vrediah. Klaoda Ar Prat, e zou bet digemeret barh get en hanü a *Varz Plougastel*. Jos Albaret hag Andreu Mellage zou bet digemeret ou deu el mabineion, er hetan get en hanü a Vruger hag en eil get en hanü a Huedour.

Arlerh en digemer se e kanner hoah sonenneu hag e achiuer dre *Bro goh me zaden*. Er varhed e zichen neze eit hum zihuskein en ur gan *Saü Breih-Izel d'er huez de vanieleu*, hag ol en dud e zistro trema Rosko, eurus bout guelet ur gouil ken kaer ha bout kleuet konzeu ker gredus.

Peh leh kaeroh eit er roh se e vehe bet kavet eit gober el lideu ? Ar zaü inou, ou zremmeu troeit trema er mor-bras er Varhed e oe ul limaj kaer a spered Breih-

zel goul gaset ha pilet a bep tu get ur mor a vreinadur, hag e zalh neoah, deustou da gement se, sonn, glan ha difistur.

Deustou d'an auel fal, d'en houlennou e anseou hun diskar, ni e zalhous atañ de drel er pear horn a Vreih, konzeu a furnez, konzeu a vadelez, konzeu a huirione. *Er quir enep d'er bed.* chetu aze er girieu e zalhemp dehe betag er mari. Kaer en dou gober hun eneberion, kaer ou dou goalgonzal ahanomb, ni a iei atañ iann get hun hent hag un de e zei ma vou guclet e splanenin endro, ar vro karet Taliesin ha Sant-Herve, heaul kaer en Huirione a behani e konze er barh Abherve.

EP BARI LABOURER
Segretour Brediah er Varhed.

PREZEGEN

Lavaret gant KLAODA, deiz e zigemeradur er Gorsedd.

BARZED ENORUZ. VA BREUDEUR.

Euz a beleac'h e teu d'in me an enor dispar a zo hirio evel va gwiskamant ? O kemeret ar gomz evit ar vech kenta dirak eur rummach tud evel houma, va c'halon a lamm meurbet em c'hreiz hag a venn ranna. Lezit ac'hanon goulskoude da lavaret d'eo'h eun nebeudik komzou egiz ma c'hellin. Me fell d'in en eun dervez ker santel lavaret da wir zervicherien Breiz-Izel ar garantez a zo em c'halon evit va mamm-vro, hag ar pezh a meuz va-hunan c'hoant da ober evili.

Ha da genta, bennoz, mil bennoz da Renerien ar Gorsedd ha d'an oll varzed ho deuz ar vadelez dispar d'am digemeret en o zouez en desped d'am nebeud a dalvoudegezh.

Na mantruz eo gwelet stad hor bro Breiz-Izel en deiz a hirio ! Pegen doue eo eat an drouk ! Na ker a gousto al louzou a dle he farez ! Ar pezh a ra ar gwas drouk eo ar c'hreizadek, sklear eo. En hon amzer na weler nemed Paris. Ha perak e rankomp-ni. Bretoned, beza bleinet evel ar Barizianed ha n'ho deuz goulskoude nag an hevelep goad, nag an hevelep doare beva ganeomp, n'ho deuz ket ivez an hevelep ezommou.

Hen adlavaret a ran, ar c'hreizadek a gas ac'hanomp da goll. Poent, mall braz eo stourm ouz eun dra ken direiz evit ma vezimp renet ha servichet gant tud euz hor goad hag euz hor iez, evit ma vezimp muioc'h dishual en hor bro benniget !

Ni a fell d'emp sevel hor bro Breiz en he enor gwechall, en he galloud, en he eürusted. O ! her gouzout a ran, kement-se a vo tem ; kalz a zrein a gavimp var hon hent ; a bep seurt komzou displeal ha digalon a glevimp meur a vech. Kalz a dud na ententint ket hon doare da gomz hag a rañ fae varnomp var hor c'homzou. Tretet e vimp zoken marteze a dud diskiant ! Ha petra ra ze ? Ar Breizad kalonek deuet da veza abostol a zo krenv ha kalet evel " Reier Plougastell." Netra n'hen harzo, nemet fale'h ar maro. D'ar mare-ze na dudiuz e kavo mouez sent koz Breiz-Izel o lavaret d'ezan evit he frealzi : « Servicher feal, n'out ket deuet a-benn euz da vennad ; na c'heuz ket bet an eur-vad da welet da vamm Breiz en he zav, skeduz, leun a c'hloar hag a c'hened ; hogen, taolet ec'h euz an had. Bez dienkreiz, diwan a rañ, re-all a costo ; re-all a welo deizioù skeduz an amzer dremenet o para a nevez var an Arvor. Deuz eta da ziskuiza !..

Tra ma vo mor en dro da Vreiz,
Karantez va bro a vo em c'hreiz !

Evel ar zoudard kristen o vont d'ar brezel, ar barz kalonek a lavar : Marteze n'em bezo ket ar gounid, marteze zoken e vezin pistiget pe lazet ; petra ra ze ? Ma vir va bro he frankiz hag he renk enoruz !

A greiz kalon e lavaran :
Bezet Breiz-Izel, frank ha dishual !

KLAODA
Barz Plougastell.

Me gar ma Bro

Da Job an Drouz-Mor ha Bleinor

Me gar ma Bro, o Bro brudet
Ar merc'hed koant, an dud kaled,
Maget gant gwad hon re varo,
Gwele va zadou krenv ha ter
Trec'het 'n eur zifenn ho zier :
Me gar ma Bro.

Me gar ma Bro, rag en e c'hreiz
Evel ar roc'h 'ma stard ar feiz :
Doue a zo karet eno,
Ar Sent hag hon mam ar Werc'hez,
Santez Anna hon rouanez :
Me gar ma Bro.

Me gar ma Bro hag e iez c'houek
Komzet gant paotred kalonek ;
Beteg mervel me c'HOURENNO
Evit difenn ar Wirione,
Hon iez, hon gizioù ha Doue :
Me gar ma Bro !

Me gar ma Bro-Breiz, ma c'havel,
En ho tivreac'h, fell d'in merve
Luskellet ganeoc'h, me gousko
Da drouz ar mor hag ar c'hoajou,
Eürus e-kreiz va c'hentadou :
O Breiz..... ma Bro !!

Klohars-Karnoët

LEON ar GOURENNER.

D'AM DOUSIK

Pa welan, d'an hanv, ar parkou
Leun a ed kaer, a ed melen
A vranskel gouztad ho fennou
Dindan alan dous an ezen,
Me a sonj, plac'hik didammal
'N es kurunen vleo alaouret
A vouznij tro war dro d'as tal,
Bannigou skanv, bleun a c'hened.

Pa welan an oabl glaz ha skler,
Kaer 'vel an de moa bet krouet ;
Ar mor zioul, hag en e donder
Kement a denzoriou kuzet,
A zonjan 'n ez lagad ken flour
Dous he zell, leun a garante,
'Zo 'vit ar barz ar meleour
Deuz holl denzoriou da ine.

Ar bleun a zigor war ar maez
Ouz mouze'hoarz an nevez-amzer
Daerou an noz evel perlez
War ho deliennigou tener,
Na n'int ket freskoc'h, gwerc'hezik
Evit da jodou voulouzet
A weler warné ken braoik
Liou ar roz, al lili mesket.

**.

An edou melen ha sammel,
D'an eost a vezo astennet
War an erv gant falz ar meder ;
An oabl skedus ha digoummol
'C'hell bean kuzet d'emp 'n eun taol
Gant eur waben du ha pounner.

Ar mor 'teu e lano a bell
Goustad war an aod da vervel
'N eun taol 'vo gwelet fuloret,
Ar vleuennik ken koant fete
Dindan bannou heol ar beure
Emberr a vo kavet goenvet...

Da c'hened ive, ô plac'hik,
 'Vo laëret tammik ha tammik
 Gant hec'h enebour an Amzer !
 Mez da ine ken glan, ken gwen
 'Gredan ket a chancho biken
 Ha kement-se em lak seder.

Gwengamp

LAOUIK

Diou Varzoniez di-embann

GANT GAB MILIN

MEULEUDI DA ZOUE

Great en Santez-Anna ar Porzik, ar...

Ac'halenn a velan ar mor o rodella
 O ruilla oc'h an aod gant krosmol e wagou
 A vern 'vel menesiou.

Az iouzin e klevan eun eostik o kana,
 Euz eur vojen gelvez e sav e vouez dudiuz
 Laouen ha truezuz.

Mor braz, labous bihan, livirit d'in da biou
 E kanit enn ho iez kemend a veuleudiou ?
 Da Zoue an Nenvou,
 Hon mestr hag hon Aotrou.

Ha te, ieotennik c'hlaz, te, diskaret aman
 Emzivadetik keaz, etre fraill ar garrek,
 Eul lommik glizen c'houek

Hag an neubeudik douar a ra d'id-te beva,
 Perag e soubl da benn, perag e sao goude ?
 Evit meuli Doue

A zigas d'am floura, alan domin an ezen.
 'Vel ar mor, an eostik, evel ar ieoten,
 Kanomp, soublomp hor penn,
 Meulomp Doue hepken.

Ni zo e vugale a vag gant larjentez ;
 Ar penn-ed evidomp a skrij war he gorzen,
 Evidomp ar vezen

A astenn he skourrou da rei skeud he frouez ;
 Evidomp-ni an heol a sklerijen ar bed
 Ha pa 'z a da guzet

Ker stank ha treaz an aod, e bolz an nenv laouen
 E trid an holl stered ; evel kant goulouen
 E strinkont sklerijen
 Hed an denvalijen.

Nag a draou, va Doue, hoc'h euz evidomp krouet
 Er mor ha war an douar hag en ho paradoz
 A zo ouz hor gortoz !

Dioc'h ar bed-man c'houero distagomp hor spered ;
 Evel an alc'houeder, displogomp hon eskel,
 Nijomp war an avel,

Dreist an heol, ar stered, savomp hor c'halonou
 Pedomp Doue, he vamm hag an eledigou
 Da drei hon holl boaniou
 Enn eur mor a zudiou !

AN DEILLEN SEAC'H

— Distag dioc'h ar vezen
 Deillennik keaz melen
 Da beleac'h ez este ?
 — N'ouzoun. Eur barr arne
 En deuz fraillet, torret,
 Brevet ha diskaret
 Enn eun taol ann derven
 A ioa oc'h va dougen.
 Abaoue ann deiz-ze
 Ez oun du-ma, du-ze
 Euz ar grec'hen d'ar c'hoat.
 Ann ezen, ar gaouad,
 Va c'has ha va distro

Gant he alan hedro ;
 Morse ne ehanann ;
 Gant ann avel ez annn,
 Hep herzel nag harpa
 El leac'h ma 'z a pab tra
 El leac'h ma 'z a 'r gened,
 Ar iaouankiz, ar sked,
 Ann den braz, pinvidik,
 Ar paour keaz reuzeudik,
 Ar roue, ar merer,
 Tud ha traou, en eur ger.

GAB MILIN

(Digaset gant F. Even).

SUZIK

Breman zo eun hanter-kant vloa bennag, oa eun intanvez o chom e Stang-an-Haon, peurdost da Sant-Thurien, hag hi koucet en eun dienez vraz goude maro he fried. Ken c'huëro oa he buhe ma n'e dije ket kerzetpell diouz an nec'h hag ar baourente, panevet en doa roet Doue d'ei eur verc'hik, ar goantan a oa da welet dre garteliou Breiz-Izel. Ar verc'hik-ze, Suzik e hano, gaë 'vel eur werelaouen, a gonsole he mam dre he c'hoantiri ha muioc'h c'hoaz dre he c'harante tener. Pa vije Suzik dirag e daoulagad, an intanvez a zizonje deuz pab poan ha tristidigez.

Fur e oa Suzik kement hag e oa koant. Biskoaz n'e doa groet an disteran displijadur da zen a c'houde ma oa deuet en oad da gompren. Eun tech e doa koulskoude, ia ! Mar d'eo eun tech chom avechou re bell da zellet ouz an oabl glaz dre an deiou splan, pe d'arvesti ar stered lemm strêet evel bleuniou-aour dre an nenv epad an noziou skleriuiz.

« — E petra zonzit-hu, Suzik ? a lare e mam d'ei neuze : Setu c'hui adarre en ho hunvreou. »

— « Mam, a responte ar plac'hik, me zonzj ema kaër ar baradoz a dra-zur en diabarz, peguir hen kavan burzuduz euz an diavez ! »

An intanvez e ië jiuadennoù dre he c'halon o klevet kement-se : Aoun e doa da goll he merc'hik a garante. Ken glan eo, emezi d'ei e-hunan, m'o deuz an eled avi diouti ha ma teuint martreze d'hi lemel diganin ha d'hi c'hemer en ho souez.

Dont a reaz evit Suzik ar mare d'ober he fask kentan. O devez eüruz ! Gant pebeuz feiz, gant pebeuz joa e tostaas da gaout Jezuz ! — Allaz ! Ar levenez a ve aliez lost d'an anken. D'an abardaë, tro jerr-noz, setu ar plac'hik tiet dre an derzien hag astennet gwal-glaon war he gwele. Ken kountant e oa hi bet en de-se, ken n'e doa ket marfad gallet dougen eur boneur re vraz evithi.

— C'hui hell kredi, ar vam na zellaz ket deuz di spignou ; prestik e oa da werza beteg e beuc'h vriz-melen ha d'en em lakat en aluzen evit terri klenved Suzik. Daou vedisin a oa galvet ganti ; louzeier ha louzeier a oa roet d'ar plac'hik : netra ne reaz vad. Benn eiz d'ei warlec'h e oa korf Suzik war ar vaskaon, hag hi ine a ië da welet pegen kaër e oa diabarz ar baradoz da behini e hunvreë ken aliez arok.

Piou laro dizesper an intanvez paour, he-unan war an douar ha kollet ganti holl gonfort he buhe ? — Dare oa bet dei bout kollet war an dro he skiand-vad. Gwela reaz kement ma skuillaz, en eur vech, an holl daëlou krognet en he daoulagad abaoue maro he goaz. Ouspenn gwela, hi a bedaz, ha biskoaz kristen na bedaz ken stard nagant brassoc'h c'hoant da douch kalon an Aotrou Doue. Gwela ha pedi, a rë ken epad an dë, rag n'he doa ket mui nerz da labourat ; gwela ha pedi, na rë ken hed an noz, rag na gouske tamm ebet a c'houde oa dispartiet deuz he merc'hik. En he glac'har, en he hirvoudou, hi c'houllte gant Doue gwelet c'hoaz Suzik, digas en dro Suzik d'hi c'haout, rak penoz beva hep Suzik ?

Doue a gemeraz true deuz he glac'har ken divuzul. Peden ha daëlou an dudigou paour a zo aliez gallouduz war galon Mestr an nenv hag an douar.

Eun nozvez e oa an intanvez o taëlaoui hag o pedi Doue evel kustum, setu en eun tol an nor da zigori, hag, e kreiz bannou-splann ar loar a rë sklerder d'an ti, setu eur weledigez kaër, e furm ha ment eur plac'hik a zek pe unek vloa.

— « Suzik, eme ar vam, oc'h anaout he merc'h, skeduz evel an eled ha dudiuz dreist holl draou gaër ar bed-ma ! — Hag ar weledigez a zo ken dous d'he c'halon, ken na gred mui fichal, egiz aoun deut d'ei da zihun euz eun hunvreë plijaduruz meurbed.

Mez Suzik a zeu beteg-hi, eur mell-hanafad dour etre he daouarn : dougen a ra gant evez an hanaf-ze, rak leun-vez eo hag aoun he deuz na skuillfe an dour a zo ennan.

— « Mam, a lar Suzik, Doue en neuz chilaouet ho peden. Deut oun euz e beurz d'ho kaout ; mez klevit mad ar pez am meuz ive da laret d'oc'h. — Me zo eüruz er baradoz ; ma eürusted zo hep par ha n'hellit ket hen kompren. Pa zë deut Doue d'am galven, an daëlou n'oant ket difennet, mez hervez ar rezon. Arog bout d'oc'h, me a oa da Zoue, ha dre ho klac'har divoder c'hui a offans e vadelez. — Sellit ama ho taëlou holl ebarz an hanaf ; leun-bar eo ar muzul ; mar teu d'han dic'hлана, e vo red d'in dont en dro war an douar ; diwallit na c'houelfec'h ken pe c'hui rai d'in koll ma flas, er baradoz. »

Ar weledigez en em zilaz kentiz, o lezel war he lerc'h eur c'huez-vad, c'hüek evel hani ar bokedi-hanv dre ar prajeier.

— « O ma Doue, eme neuze an intanvez, na diaviz oa ma glac'har ! Pardonit d'in : me oar breman perag ho peuz tennet diganin ma merc'hik a garen kement ; c'hui hi c'hare c'hoaz muioc'h ; Bezit benniget da virviken ! »

Eun daël pe zaou a ziveraz c'hoaz war ziouchod an in-

tanvez, mez daëlou a joa oant ne ket daëlou a geünz. An hanaf na skuillaz ket, ha Suzik a chomaz gant Doue er baradoz, da c'hortoz ma iez he mam da gêmer lod euz he eürusted. Gras d'emp-ni, eun devez bennag, da gaout ar memez boneur gantê!

27 a viz Gwengolo.

F. AR MAY.

FRANSEZA

A-boan m'oa soumet kloc'h pemp heur diouz ar mintin e iliz Sant-Martin-Brest, m'edo Franseza, skuiz c'hoaz gant labour an devez araok, en he za; rag hi a ranke tomma soubenn he goaz a dlee beza araok c'houec'h heur war e labour, duhont e Sant-Marc el leac'h m'edeur o sevel eun ti nevez. Ar c'henta tra a-vad a reaz Franseza, en eur ziskenn euz he gwele kloz, oe en em zaoulina dirag eur groaz koat prenvedet oll dre ar gozni. Koulskoude Franseza ne divije biken roet ar groaz-ze evit priz ebet, rag hounnez a zeue digant ar gerent koz, euz a rumm da rumm, hage Breiz-Izel e talc'her stard d'an traou benniget a zeu digant ar gerent.

Goude beza dastumet en eun lianen fresk eun tamm bara hag eun tamm kig moc'h, oll mern Lan he goaz, e teuaz tro ar vugaligou, pevar baotr ha peder baotrez, euz a bere ar c'hosa, Fanchik, n'en doa ket pevarzek vloaz, hag ar iaouanka, Soazik, ugent miz. Eun dudi oa hi gwelet o vont euz an eil d'egile, en eur boket da bep hini, hag en eur o lakaat da ober zin ar groaz ha da lavaret eur Bater verr. Hepdale ar vandenn a oe gwalc'het, gwisket ha renket oc'h an daol zero war behini e tivogede eur skudellad souben dirag pephini. Ar re gosa a oe kaset d'ar skol goudeze, nemed ar verc'h hena da behini e oe roet an daou iaouanka da ziwall, rag Franseza n'e doa ket a amzer da goll, hag evit gelout beva ha gwiska he eiz krouadur e tlie rei skoazel d'he goaz; n'eo ket chom er gear da ziwall bugale eo a dlle eta, rag aze, e kougn ar gampr, e chome c'hoaz, abaoe deac'h, eur bec'h dillad da c'hwalc'hi. Ia, brema Itrounez mad, dre druez outhi hag ouz he bugale, a roe d'ezhi dillad da c'hwalc'hi, ha kement-se a lakea eun neubeud levenez en he c'haloun e kreiz he gwall- eur, rag abaoe c'houeac'h miz m'oant deuet da Vrest n'o doa ket bet atao amann da lakaat war o bara. E kear e vez disfianz er re ne anavezer ket awalch; evel-se Franseza ha Lann a ioa bet chomet eur pennad mad dibreder, rag kaer o doa redek ar ruiou evit klask labour, e veze atao respountet d'ezo: « n'euz ket a ezomm er mare-ma, deuit divezatoc'h ». Deuit divezatoc'h! pebez respount kriz evid an nep en deuz kov goulo! ha gouzout a rit ervad ne gaver ket a batatez etre mein ruiou kear Vrest.

Franseza eta, goude beza trouc'het peb a damm bara, gand amann en dro-ma, evit mern pephini euz he bugale, hag eun tamm all evithi, evit debri e-kichen ar poull, a zammaz laouen he bec'h dillad war he c'hein en eur zonzal ne zeufe ket e-verr ar re iaouanka da grial: « mamm, m'em euz naoun! » hag ar re gosa da lavaret goustadik en he skouarn: « mamm, deomp en dro d'hor parrez! » Ar geriou diveza-ma, dreist-holl, a ranne he c'haloun, rag hi ivez he divije karet distrei war ar meaz. Siouaz! he levenez ne badaz ket pell.

A-boan m'he doa diskennet an hent striz a ia da Boull-ar-Bachet, ma c'h en em gavaz penn-oc'h-penn gand eun hanter dousen kouezierzed o doa o bleo dispag ha fuillet dindan o c'hoef a-dreuz war o c'hern; o daoulagad a ziboufe euz o fenn evel daoulagad diodezed, ha c'houez ar gwin-ardant a flerie oc'h-penn ugent kammed en dro d'ezo.

— Sell 'ta, eme Fant Soroc'hel, ouz ar penn chikoloden-ma! Petra eo deuet da ober e kear? Da zacha hon hostizien diouz he zu, na petra 'ta! Gwelet a rit, dillad euz ti va hostizez wella, an Itroun Kalounaour, a zo ganthi.

An Itroun Kalounaour, michans, a ioa eun hostizez vad da Fant Soroc'hel, rag atao pa veze distroet an dillad fresk e veze diank eun dra bennag. Fant a lavare, en eur gluchenna, e oa bet laeret, pa oa hi eo a werze

an tamm dillad evit mont d'an tavarn gand an arc'han- anezan. An Itroun Kalounaour a bardoune, med evelato e teuaz da vond e kounnar eun devez, hag he doa kaset Fant da bourmen evit kemeret Franseza da behini e lavaraz taoler evez ouz he dillad muioc'h eged na rea Fant.

— Mad, eme Rosali Pilpous, p'eo gwir e sach hon labour diganeomp, hi ne labouro ket kennebeud.

Koulskoude Franseza, heb respount eur ger, e doa gelllet evelato tizout ar poull, hag hi da gemeret war- laez d'ezan ar mean tosta d'an eienen, el leac'h ma vez skleroc'h an dour. E fesoun e doa en em faziet, rag setu eur gouezierzed all, Viktorin Skrabato, o tont gand he bec'h dillad ivez.

— Petra an tamm foeltr a rit-c'houi aze, chikoloden daonet? eme Viktorin. Daoust hag abaoe peur eo deuet ar c'hiz d'ar re nevez deuet e kear d'en em lakaat er penn huel euz ar poull? Diskennit, mar plij, chikoloden daonet, ha buan.

Hag ar c'houezierzed holl da grial a bouez penn war Franseza:

— Chikoloden daonet, chikoloden daonet, kea da c'horro da zaout, kea da c'horro da zaout.

Med Franseza a reaz an neüz da ober skouarn vouzar, a zoubaz eun tamm dillad er poull, her saonaz, ha... top, top, top... ar c'holvez en araok. Kement-se a lakeaz muioc'h c'hoaz a gounnar er c'houezierzed ha dreist-holl e Fant Soroc'hel pehini a lammaz en eun taol war bec'h dillad Franseza hag her stlapaz a bez e-kreiz ar poull. Franseza neuze avad a zavaz drant en he za:

— N'oc'h euz ket mez da lakaat an dourn war eun dra ha n'eo ket d'oc'h na d'in, eme Franseza; kement-ma a zo re divergount.

Hag, heb lavaret muioc'h, e vuntaz nerzuz Fant Soroc'hel pehini a iez, evel pa ne divije bet troad ebet, da heul ar bec'h dillad e-kreiz ar poull. Neuze ar c'houezierzed holl a dapaz krog en o golvez hag a zaillez war Franseza pehini, pell da goll he fenn, a stagaz ganto heb chom da varc'hata. Golvez Franseza a zave, a rea ar rod, hag a goueze gant strouns, rag bep tro e tize: « top... war da dailler, mar peuz drebon; top... war da gein, mar peuz c'hoenn », a lavare Franseza bep taol ma roe. Koulskoude, oc'h an niver Franseza e divije kollet; he diskoaz hag he divrec'h a ioa hepdale bronduet gand an taoliou, pa lammaz kerkent daou zen beteg ar poull. Ar re-ma, moarvad, a ioa anavezet gand ar c'houezierzed, rag a-boan m'o doa tennet eur paper euz o godel vihan ma teuaz ar golvezioù da goueza holl d'an douar evel unan. E gwirionez an daou-ma a ioa euz ar bolised-kuz; euz ar re-ma ez euz e pep leac'h e kear. Da ziwall ez euz outo, rag hi a zo sparfelled hag a anavez mad an doareou. Kemeret a rejont dustu hand pephini euz ar c'houezierzed en eur lavaret:

— Lezit e peoc'h ar vaouez-ma gand he labour, pe ni ho kaso d'ar palez el leac'h ma kousker ha ma tebrer evit netra.

En taol-ma avad kounnar ar c'houezierzed a ioa kouezet, ha Franseza a c'hellaz, didrabaz, kregi stard gand he labour.

Araok kreizteiz ann dillad a oa gwalc'het ha Franseza, goude beza debret he zamm bara, a en em lakeaz da astenn he c'houez da zec'ha war ar bodennou a zoen eur oaremm a-uz Poull-ar-Bachet. War dro pemp heur an dillad a oa seac'h hag hi d'ho dastum, en eur ho niveri piz.

En eun taol kont e chomaz a za, mantret, droukivet. « N'em euz ket hunvreet koulskoude, emezhi, » ha Fransesa d'ho niveri a nevez. En dro-ma avad he c'halon a sklasaz; nan, n'he doa ket en em faziet ar weach genta; eur pallen kaer, ar c'haera tam euz an dillad, n'edo mui er c'houez, hag hi da zellet etre peb boden. Marteze, a zonje, eo kouezet d'an douar gand an avel. Siouaz! ar pallen n'edo ket war an douar ken neubeud. Laeret! laeret! O! Santez Anna, bezit truez ouz in!...

Nag a enkreuz a oa en he c'halon enn eur bignat an hent striz, pa zistroaz d'ar gear gand he beac'h! Petra a zeuin da veza adarre? An Itroun Kalounaour, ker mad em c'henver hag e kenver va bugale, m'oar vad n'he devezo mui fisians en-oun; marteze e kredo oun ive euz

laerez; me eul laerez! O! Santez Anna bezit truez ouz-in.

En eur en em gaout er gear he c'haloun a oa re leun hag e fallgalonaz; koueza a reaz, kentoc'h eged na azeaz war eur skabell, hag he zal en he daou zorn e tirollaz da ouela dourek. Ar vugaligou kez, en eur welet ho mamm beuzet en he zaelou, a zirollaz ivez da ouela, ha pa zeuaz Lann er gampr, he zremm glebiet gand ar c'houezen hag he zillad goloet a boultren, e chomaz eur mare sebezet, he zivreaç'h kroaziet, evel eun den ha ne fell ket d'ezan kredi ar pez a wel hag a glev.

Koulskoude Franseza, e berr gomzou, a zisplegaz d'ezan ar pez a oa c'hoarvezet, ha Lann, en eur huanada, da lavaret: « maouez keaz, bugaligou keaz, Doue a zeu d'am c'hastiza da veza dilezet hor parrez; ia, me eo a zo kiriek a gement-ma, pardonit d'in, me ho ped ».

— Lann, eme Franseza, tou e tistroi d'hor parrez, m'hon euz an eur-vad da veza soveteet euz ar stad reuzeudik-ma. — Hen toui a ran, Franseza. — Mad, emezhi, atao em euz bet fizians e Santez Anna, greomp eur beden d'ezhi; hag hi holl da zaoulina:

Santez Anna, hor patronez,
Hon diwallit, e peb amzer,
Bезit 'vidomp advokadez
Dirag Jezuz, hor Zalver.

Ar beden-ma a oa evid an dud kez evel ar gliz evid ar bokejou; eun neubeudik peoc'h a ziskennaz en ho c'halonou hag e teuz neuz da zonzj d'ezo n'ho doa ket koaniet c'hoaz.

Marianna, ar vere'h hena, a ieaz da gerc'hat ar skudellou; da genta e lakeaz war an daol skudell he zad, da c'houde. skudell he mamm; an derved skudell a oa hini Fanchik.

Fanchik? Fanchik? — Fanchik ne respontaz ket; n'oa ket deuet c'hoaz d'ar gear. Petra! Fanchik ken divezad! Fanchik al lagad lemm, Fanchik ar mab sentuz a veze atao er gear d'an heur gourc'hemenet! Neuze eur zonjezon grevuz a zeuaz e spered Franseza. O! emezhi, ma 'z eo beuzet ar paotr keaz! Rag Fanchik a oa eun neuer dispar, ha bep pardaez, da c'houde ar skol, ez ea d'an aot, du-hont, er Gaz. Hogen, eiz devez araok, eur paotrik euz he oad a oa bet beuzet eno. Enkrez ar vamm a ieaz buan e kalon pep hini hag hi holl da vont a bep tu da c'houlou digand an amezeien ho n'ho doa ket gwelet Fanchik. Den n'en doa her gwelet abaoe peder heur. Lann a ioa o vont d'ar red da gemeret hent ar Gaz, pa welaz o tont, er penn all d'ar ru, Fanchik, eur pakad a-zindan he gazel ha gantan eur serjant-polis.

Setu ama perag e oa Fanchik ken divezad o tont d'ar gear:

En eur zont euz ar Gaz, Fanchik, dre zarvoud, a dremenaz dre c'hoarem Poull-ar-Bachet, hag en doa gwelet eur vaouez o sacha eun tamm dillad diwar eur voden hag her c'huzat dindan he zavancher. « Sell 'ta, eme Fanchik, homa a dle beza eul laerez. Daoust ha ma iafen d'he heul evit gouzout beteg peleac'h ez ei gand an tam dillad-ze ». Ha Fanchik da vond war he lerc'h en eur jom avad ar pella ma c'helle diouthi, gand aon da veza gwelet. Eur pennad mad a hent a rankaz da ober, rag ar vaouez a ieaz euz an eil ru d'eben en eur ober troiou kam, araok mont en eur pors. Ar vaouez a bignaz goude-ze beteg ar bemped euz eun ti e founs ar pors-ze, ha kerkent Fanchik, d'ar red, da c'hervel ar bolised.

Al laerez a oa Fant Soroc'hel; ne c'hellaz ket nac'h; hi a oa paket evel etre lost an diaoul hag he draped ha kaset e oa raktal d'ar palez el leac'h ma kousker ha ma tebrer, evit netra.

Displega al levenez a oa en dud kez o welet ar palenn o tont gant Fanchik, va fluen a zo re zister evit kement-se. Ne lavarín mui nemed eun dra, rag al lenner a dle beza skuiz.

O veza m'he doa Santez Anna selaouet peden an dud kez, Lann ivez a zalc'haz d'he c'her. Hirio en deuz eun atant euz ar re wella; Fanchik al lagad lemm a zo brema Fanch, eur goaz hag a ro an dorn d'he dad. Pa ia Franseza da welc'hi dillad d'ar ster gand he merc'h Marianna, e komzer aliez euz Poull-ar-Bachet hag istor

Fant Soroc'hel, stlapet e-kreiz ar poull ha kaset d'ar palez el leac'h ma kousker ha ma tebrer evit netra, en deuz akeat meur a hini da c'hoarzin.

Brest.

PER PRONOST (Barz Treflez).

JELVESTRIK

Ar Chouan Bihan

TRAJEDIEN EN PEVAR ARVEST

Gant an ARC'HANTEK

(Kendalc'h)

GUILLOU

A perag?

Tenna war Gristenien 'vel war al loned gwe?
An taol-ze a zo bet great gant eun dizane
Moarvad eo an hini neuz gwerzet e vreudeur
Eun den heb konztiand, hep kalon...

HERVE SAZI

Benn nemeur

Vo klevet he hano hag a vo kondaonet
D'ar maro.

GUILLOU

D'ar maro!

HERVE SAZI

D'ar maro me a gred.

Ma ve diskwellet mad he gabluzidigez
A haio deuz ar grouk 'vit he fallagriez.

Kevren IV

AN ABAD LOEIZ, HERVE SAZI

Devez mad dec'h Herve!

HERVE SAZI

Devez mad d'ec'h Aotrou.

Penez a ia an dud?

AN ABAD

Mad zur eo ar c'helou.

An dud, klevet Herve, zo deut da gozeal
Hag o deuz lared d'in laret dec'hu raktal
Mont da welet ané, ar c'henta ve ar gwell
Evit diskleria d'ec'h kelou war ar brezel.
An dud ze, me lar d'ec'h, a zo tud a feson
Deuz risket ho bue 'vit diskuill trahizon.

HERVE SAZI

A gwir a vefe ze! O, brasa plijadur!
Gallout gouzout erfin hano an den dinatur
A zo fallakr awalc'h evit gwerza hon gwad,
Gwad tadou a famill kuzet ebarz ar c'hoat
'Vit difenn ar Roue hag ar Relijion
Enep an holl dud fall, enep an Nasion.

AN ABAD

En peb lec'h 've kavet bugale da Judas
Evit tregont diner ha vit neubeutoc'h c'hoaz
Da werza ho breudeur, ho zad, ho mamm, ho c'hoar,
Ho c'horf hag ho ine hag ive an douar
E lec'h int bet ganet.

HERVE SAZI

Tud evelse Aotrou

Na n'int ket kristenien, med kentoc'h int diaoulou
Henvel int deuz Satan Tad an drubarderez
Prest evit eur gwennek da laza, da laerez
D'ober an holl grimou hep remors 'n ho c'halon
Tud evelse Aotrou, na deuz ket gwad Breton.

AN ABAD

Pa vo kavet an den a varnfet anean
Deuz an drouk a neuz gret. Na ret ket evelthan.

HERVE SAZI

Penez?

Zilaouit ta.
AN ABAD

HERVE SAZI
Kaozeet ta, Aotrou.

AN ABAD

Lavaret a ran d'ec'h paz mont war he roujou
Mez bea just atao evel a c'houll Doue
Rag an hini a varn a vo barnet ive.

HERVE SAZI

An den a vo barnet deuz ar pez a neuz gret
Evel barz eur lez-varn, evel ma eo dleet.

AN ABAD

Mad, gwell a-ze Herve. Et da welet brema
Ar re zo o c'hortoz. Doue d'ho piniga !

Kevren V

JELVESTRIK, e-unan

Asa ta ma Doue ! Daoust piou eo an dud-ze ?
A zo deut trezek aman en risk deuz ho bue
Pa meuz gwelet ane ma gwad em gwazied
Ha ma c'halon em c'hreiz a oa holl entamet.
Lavaret reont d'in : Jelvestrik ma mignon,
Da dad ha da vreur Loeiz zo aze en gwirion.
Ma vijent 'vit kaozeal a mije goulennet
Piou a reer ane. Ma c'halon zo mantret !
Chom atao en arvar war ma zad ha ma breur.
Den war an douar neuz bet gwasoc'h gwalleur ;
Evidon, koulskoude a oun c'hoaz eur bugel
O heul ar werzed mad a dreuz ar meneou
A na meuz 'vit gwele 'med eun toullat deliou.
Koulskoude vijen bet eüruz em faourte
Ma vije bet ma zud deuz koste ar Roue.
Allo ! Han da welet, han da n'em asuri
Gwelloc'h a vefe d'int dont da goll ar bar'i
Vit chom hep gout netra deuz ma zad ha deuz Loeiz
Ma c'halon vo en peuc'h e lec'h bea direiz.
Demp hag hastomp buan.

DIVEZ AN TRIDE ARVEST

(Ar ridoch a ziskenn)

PEVARE ARVEST

Kevren I

HERVE SAZI
Setu ni ta gwerzet !

GUILLOU

Ni gwerzet ! Gant piou ta ?

HERVE SAZI

Ia ni ar Chouanted !
Ia eur Judas neve a zo barz Bro Arvor
Neuz gwerzet e vreudeur, neuz gwerzet he enor
Vit eun toullad arc'hant.

GUILLOU

Neuz gwerzet ac'hanomp d'ar republikaned ?

HERVE SAZI

Piou 'med lann ar Merer miliner ar Poull-Du
Ar malloz war he benn teui da gweza dustu
Pa glevo tud ar Vro eur c'helou ken mezuz.

GUILLOU

Para d'ober ?

HERVE SAZI

Para ? Kas ar c'helou doaniuz
D'ar barziou war dro, 'vit teui an dud ama
Rag hirie pe varc'hoaz vo ar stourm ar gwas.

GUILLOU

Lavaret d'in Herve, pe lec'h a n'em vodfomp ?

HERVE SAZI

Lavar d'e dont aman, aman eo a stourmfomp.
Ret a vo did Guillou kas kelou en peb ker
Goude teui war da c'hiz, rag berr eo an amzer
'Vit engali an treo.

JELVESTRIK

Ar c'helou n'int ket mad ?

HERVE

N'int ket gwell vad, ma fotr.

JELVESTRIK

Prestik vo ar gombat ?

HERVE

Allo ta, ma fotr kaez ! Neuz ket amzer da goll
Hast, a kerz gant Guillou, pep hini neuz he rofi
Evit kas ar c'helou.

GUILLOU

Kenavo ta Herve.

JELVESTRIK

Kenavo.

HERVE

Kenavo. Chomet ket da zale.

Kevren II

HERVE, EUN TOULLAD CHOUANTED

Preparit oc'h armeou ha bezit kalonek
Rag hirie pe varc'hoaz, teui ar gwad da redek,
Kalz ac'hanomp marteze gwiteo ar vue
Evit palez ar gloar gant ar Sent, an Aele.
Holl oc'h kristenien vad, tud a relijion
Difennerien ar Vro, an oter hag an tron.
Dispont raog ar maro vel hon tadou gwechall,
Biken eur Breizad mad na gren dirag eur Gall.
N'eo ket gwir, mignoned ?

AR CHOUANTED

Nan ! biken na grenomp !

HERVE

Pa teuo ar re c'hlaz, tamm a tamm a hefomp
En donder ar c'hoajou en eur denna bepret
Vit bihannat ar ouenn deuz ar c'hoz Gallaoued.
Benn eun heur marteze a teuo d'emp skoazel
Deuz Poullaouen, Skrignak, Bolazec, Plonevel
'Vit reseo vel zo dleet potred ho bragou moan
Kalz a zo dioute na zebfont ket o c'hoan.

Kevren III

HERVE, EUR CHOUAN

Para zo neve ta, a kelou fall a zo ?
Da dremm a zo ken gwenn evel eun den maro,
Lavar din ta, ma fotr.

AR CHOUAN

Erru eo ar re c'hlaz.

HERVE

Koste pelec'h a maint ?

AR CHOUAN

Duze war an hent braz

Tal kichen ar Merdi.

HERVE

Kerz, ha lar d'ar re all
Bea prest heb dale da denna war ar Gall.
Me ia da vond ive evit gwelet an dud
Hag evit laret d'e paz espern ar re iud.
Red vo skei stard a mad, red vo terri ho fenn
Da enbourien Breiz. Potr, gra ter galvaden
'Vit laret d'am breudeur ma tost ar zoudardet.
Hag evit vont prest tout da larda ar ganfarted
Hag ive da vervel pa vo erru an heur.
(sellout ra euz an nenv.)

« Doue holl gallouduz pellañ ar gwaleur
« Deuz bugale Arvor leun bepret a fianz
« A galon hag a nerz, hag ive a venjanz
« Vit an dud diredet da dana ilizou,
« A laz hon beleien, hon zadou, hon mammou
« Vit klask lakat n'hon c'hreiz eur garante dener
« Vit Danton, Robespier, Fankier, Marat, Karrier.

(Da hevit).



Efflam Kerzenan ha Mac'haridik

(DANEVELL NEVEZ)

Gant Efflam An HENORET (Plestin-an-Traez).

Kendalc'h (5)

Na oar ket kap da laret deuz Efflam Kerzenan penoz e oa eun den a vuez fall, koulskoude evel an dud-ze a en em lez da vond da heuil o zechou fall. Efflam Kerzenan evel ma c'houzomp, nemed dre ma nevoa kollet e fe, ha gallout a rer memez lâret a nevoa tremenet e vuez en kazi heb 'nem rei d'ar blijadurezou, na d'an dud a ren eur vuez fall; hag evel ar c'hastellou koz a weler heb toen, ho mogeriou, ho zourellou hanter gouezet, evelse ive en kalon Efflam Kerzenan, e chome c'hoaz eun tam bennag deuz evurusted e vugaleaj, eun tam fe bennag a zave c'hoaz, evel pillierou eur c'hastel koz, prest da goueza; an tam fe-ze, moarvad ker losk en e zav, a c'hé da goueza gant an distera taken avel a zavo, gant an distera bar amzer fall!

Efflam Kerzenan evit kaout berroc'h an amzer, a zave deuz ar beure da lenn e lizerou, e journal, ha goude e c'hé da welet e glanvourien; awechou e kemere e fuzul, pe eul levr bennag da vond da vale, var bord ar rivier, pe en dro da Sant-Nikolaz; trist e vije bepred deuz e stum, hag e welet awalc'h penoz na oa ket e benn gant ar sort traou-ze! Hir e kave an amzer.

An noz gant e zevalijen, a zeblante d'ean kalz hirroc'h c'hoaz evit an de; chom a rea en pad div, teir heur horolaj, azeet var e wele, e benn etre he zaou zorn, dond a rea zonzj d'ezan deuz an devejou a nevoa tremenet gwechall, er gamb-ze, pegen evurus e oa neuze; pegen kontant, emean, na vijen ket neuze, mez breman, na n'eo ken possubl d'in dond da vea evel neuze?.. Ha kerkent n'oun ket petra e lare d'ean e-unan en eur c'hoarzin: « Ha zonzj e teuz deuz ar vuez e renez en Pariz?.. »

An horolaj a zone, evit laret da Efflam e tremene an amzer.

Efflam a grozmole a eneb d'an hini a leze anean da zoufr evelse var an douar-man, krial a re a eneb d'an holl dud... ha dreist-holl a eneb d'ar merc'hed. « Abalamour da betra a neuz great Doue ar plac'h?... O ia! pegen kaër!... pegen karantezuz n'eo ket kalon an den iaouank fur! Pegen evuruz na vez ket! Na n'on ken evit karout! kâz a ra ganin gwelet den; gwir awalc'h eo, evel ma meuz klevet laret penoz an den iaouank fall a lac'h ker buan e dad hag e vam, evel ma rafe an distera tra!

« Dre ma teu ar gevier da c'honid kalon an den, petra ra, nemed pellaat ouz Doue, dilezel a ra ive ar relijion, deut da vea gwell diez evithan.

« Doue en deuz laret ha breman e kredan awalc'h en he gomzo: piou bennag a ra an droug, na 'n em diskouez ket gant aon da veza anaveet.... Pa nevez kwitaet an den an aotrou Doue, petra a ampech anean d'ober an drouk? An enor, ar vrud, an deveriou, ar famill, ar vro, petra oc'h dirag daoulagad an den-ze kollet gantan e fe?... Petra zo kaoz d'ar fallagriez a weler en devez a hirie?... Pa zonzjan en kement-se en em welan henvel ouz Kaïn gwech all, pa la-c'haz e vreur. »

Bizaj Efflam Kerzenan a dristaë muioc'h mui, dre ma tremene ar zonzjou-ze en e spered, hag henvel ouz an den koueet en dizesper, en em daolaz var e wele da gousket

An Itron Kerzenan na c'halle ket dizonzjal ar pez a nevoa laret d'ei an aotrou Person; na gredan ket, emei, a nefel laret d'in ar wirione, moarvat evlt non paz ober displijadur d'in!

— « Ia! a lare adarre d'ei e-unan, breman a ouzon abalamour da betra! Gout awalc'h a ra pegement a zisplijadur a ra d'in ma mab!... hag hen na pefec'h roet d'in eur mab, nemed evit ober mez ha displijadur d'in var an douar-man! N'eo ket awalc'h d'in, eta, o ma Doue, bea kollet ma fried, renkout c'hoaz koll ive ma mab!... Pennou skanv Pariz! evel ma ra an dour brein d'an dillad, c'houi peuc'h labeet, mastaret kalon ma mab; ha koulskoude pa gwiteaaz ac'hanoa, evit ar vech kenta, peger fur, peger santel na oa ket! O ia! zonzjal a ra d'in hen gwelet c'hoaz, o tont deuz ar bourk krog en dorn e dad; en de ma reaz e bask kenta!... Pegen evuruz na oa ket e dad! ha pegen evuruz na oan me ket?... Daoust hag hen na zistrofont ken, an devejou kaër-ze? »

An amzer a dremene koulskoude, hag Efflam Kerzenan a zonzje dija en deiz-ze, ma tilezfe maner Kerzenan evit

mond da Bariz adarre? Kerkent e kemerje adarre hent Pariz; arru oamp en eil zunvez a viz gwengolo.

An de-ze, Efflam Kerzena a gemeraz e fuzul, n'eo ket evit mont da chasseal, mez kentoc'h evit kemer an ér vad, mont a reaz biou ar parkeier, eur boultren gwen a zave divarné; neuze e c'heaz tresek. Sant Nikolaz, en esper kaout ér freskoc'h; mez dre oll, an heol a zeve, an deillou a oa rostet, hag er rivier, an dour na rede nemed gant poan... Poan ho devoa ar melinou o vont en dro evel ma lare Mari-Louiz Melin Sant-Nikolaz... An denved, poan d'hé o tenna o alan, a gouske evel maro, dindan ar gwez kiviék.

— « N'eo ket possubl na refe ket a c'hlaou, eme ar veline-rez, rag re dom eo deut da vea. »

Var dro teir heur hanter, ar c'houmoul du ha tenval a darnije en oabl, gwarek ar glao, eur penn d'ei er stang du, a chache ganthi gwaso ma c'halle; eur hanter heur goude, an heol a guzaz, an amzer a deuaz da veza tenval, evel an noz; an takadennou glao a goueaz ledan evel pejou ugent real; ar c'hurunou a strakaz; ar gwenilied a nije raz an dour; al loened, ar c'hezek, spontet gant trouz poumer ar c'hurun a valee buanna ma c'hallent tresek ar ger.

Efflam Kerzenan enje goaze dindan eun togos onn brazo lare ennan e-unan: « Kurunou, ker o peuc'h strakal, avel, amzer fall, ker ho peuc'h iudal, na n'oc'h netra, e-tal ar pez a dremen en eur galon vastaret gant ar pec'hed. »

An tan koulskoude a ranne an oabl, al luc'hed a rede... neuze an dour a goueaz a buill. Efflam a renkaz klask eun ti, pe da vihanan eun toull bennak evit diskloia: autren a reaz en ti tosta ma kavaz, en ti an estranjourien a meuz laret d'ec'h uhelloc'h. An avel a c'houeze muioc'h mui, an deillou a nije evit mont da 'n em dastum, en traou ar saon en eur bern, al labourerien a gemere ho benvijou hag a c'hé tresek ar ger.

Pa 'n em gavaz Efflam er Gaer-veur, an dour a gouec bepred ken a zivere e zillad.

— « Ari oa poent d'ec'h aotrou, zonzjal klask an disklaou en tu bennag, eme an hini koz pa welaz Efflam.

— Ia, eme Efflam, ari oa poent zur, en eur sellet dreuz plenken eur speuren ouz eur plac'h iaouank daoulinet dirag eur groaz, gwell divalo eo deut an amzer da vea!

— Gleb teil oc'h, eme adarre an hini koz, me meuz aze eur porpant, red eo d'ec'h chanch ho tillad.

— Trugare d'ec'h, eme Efflam Kerzenan, rag ar glao na n'euz ket bet amzer da dreuji d'in ma dillad.

— Neuze da vihana e c'helled tostaat d'an tan evid sec'ha ané, da c'hortoz ma tremeno ar pilad-man... Mac'haridik, hast buan, digas eur fagoden geuneud.

Ar gampr e lec'h ma oa Efflam Kerzenan, a zervije evel kambr ha zal da zibri, deuz ar voger e weled eun daolen benag staget gant tachou.

Var unan deuz an taolennou ze e weled eun den iaouank var bord ar mor, uhelloc'h en mosk ar reier eur plac'h, o ouela, var draon an daolen ze, e oa merket: (Konversion Sant Augustin). Var unan all, e weled adarre Sant Augustin krog en dorn e vam, trugarekad a reont Doue: ar vam, abalamour ma 'zeo retornet he mab d'ar gwir relijion, hag ar mab, abalamour ma nevoa digaset en e galon, ar peuc'h, an evurusted.

Efflam a zelle c'hoaz ouz an taolennou ze, pa 'nem gavaz Mac'haridik, gand he fagoden geuneud: goude bea bonjourret Efflam Kerzenan, hi reaz tann, klenka reaz ive al ludu evit ober plas da Védor, a oa ken gleb hag he vestr, pe glepoc'h.

Efflam a zalc'he da gonta kojou da dad Mac'haridik, en eur deuleur eur zell en dro dean. Pegen net a oa an ti! Ar plajou, an assiedou, a luc'hé koulz hag ar billigou arm, harpet ouz ar presiou. Mac'haridik ker glac'haret o welet e talc'he ar glao hag an avel da c'houeza, na lare netra.

— Meuz aon, e laraz d'ei Efflam Kerzenan, ho peuc'h aon rag ar c'hurunou.

— Ia, eme Mac'haridik, enn eur blega he fenn.

— An amzer a ia adarre da zond brao, gwelet a ran an oabl glaz, biou ar prenest, ha neuze Doue a zivall bepred eun ti lec'h ma vez digemeret an dud gand kement a vadelez hag ama...

An avel hag ar glao a davaz; arog laret kenavo da estranjourien ar Gaer-veur, Efflam Kerzenan a reaz c'hoaz eur zell deuz ho zi; toet gant plouz ha balan, na oa netra pa zelled ouz kastell an Aotrou Keriél. Eun tam jardin vihan a ré an dro d'ean, eur gwelead ognon benag, er fonz diou pe der gween avalou, ha pelloc'h en tal eur voger hanter goueet gant an amzer, eur c'holoennad wenan; en tu deou d'an ti e rede rivier Sant Nikolaz, gant eun drouz melodiuz.

Eur blijadur a oa gweled, en pad ma oa Efflam Kerzenan o kozeal gant he zad, Mac'haridik o redek deuz adallek an eil fleuren d'eben, evit gwelet hag hen n'o devoa graet drouk ebed d'he an avel nag ar glaoier; he daoulagad troet trezek an nenv a zeblante lâret: « Trugare d'ec'h, Aotrou Doue! »

(Da heuil.)

Keltia vo da viken!

(Barzonek hollgeltiek kurunet e kendalc'h Kastell-Paol)

I

En hor broik hirie petra zo digouezet ?
 Pebez arvest dirag va daoulagad souezet !
 Var zu ar meneziou, en dremvel, e welan
 Spesou ar re varo o sevel var bep lan ;
 Me glev e meziou Breiz o son o iouc'haden...
 Hag an holl a dremen, buan o redaden...
 Mez sethu var e varc'h Arzur Roue a Vreiz :
 He unan ! Va c'halon a drid ebarz em c'hreiz !
 « Paotred a Vreiz, eme Arzur, paotred a Vreiz,
 Var sao ! Var sao ! Var sao ! Rag sethu deut an deiz !
 Sellit oc'h an nenvou ! Lennit ho planeden :
 Oh ! Na skeduz ema hirie ho stereden !
 Hor gouenn a oe gwasket, siouaz, bete vreman,
 Mez Doue ar C'helled, Doue Mestr ar bed-man
 En deuz c'hoant da zastum lodennou hor gouenn krenv :
 Arog 'ta mignonned, ha sellit oc'h an Nenv ! »

Selaouit ! Selaouit ! En amzer dremenet,
 Gwechall, gouenn ar C'helled ne oa ket chadennet :
 Ar C'helled a veve digabestr, hep mistri,
 Nemed o rouane, duhont, e Bro-Geumri
 E Skos, e Kerne-Veur, en enez Iverzon.
 Ar C'helled a gare o bro a wir galon
 Rag du-hont ar Varzed a gane c'hoaz bemdeiz
 En eur zeski d'an dud ar garantez vid Breiz.

Sethu ar Romaned a zeu dre vandennou
 Hag ar C'helled trec'het 'deuz pleget o fennou.
 Tez souza rit d'ho tro, Romaned, hag hor gouenn
 Er meziou a Vreiz-Veur a gan he c'hanaouenn.

Mez petra zo nevez, siouaz, e Bro-Geumri ?
 Sethu ar Saozon fall a zeu var o listri...
 Ar Saozon a zired e bern, hag e peb lec'h
 Hon tadou a c'hourin... Ar Saozon a zo trec'h
 D'ar C'helled, hag hor gouenn a c'houzanv adarre...

Meneziou uhelloc'h evit Menez Are,
 Du-hont e Bro Geumri, a zav o c'hribennou
 Kuzet e mesk ar c'hoabr a red tro d'o fennou ;
 E troad ar meneziou e weler ar mor glaz...
 Tud a ouel var an od, aghuet an emlaz...
 Oh ! Potred Bro Geumri, red eo d'oc'h dilezel
 Ho parkeier moustret gant an dud a vrezel !
 Koulskoude, rok mont-kuit var gein ar gwagennou
 Nerz ho kouenn a zistro ebarz ho kalonou :
 Ho Rener a gemea e gleze ha souden
 A ranna e laonen houarn e diou loden
 Ha varlerc'h e lavar : « d'ar re a chom aman
 E roan da viret ganto al loden-man ;
 An eil loden ganomp a vezo miret mad ;
 Evelse e sonjimp en hor bro, er stourmad
 Lec'h gant ar Saozon fall Bro-Geumri oe trec'het,
 Bro-Geumri, Bro-Geumri, hor bro muia karet !
 Mez greomp hor c'himiad d'hor breudeur, d'hon tadou,
 Hag en amzer da zond kerzomp var o roudou ! »

An noz ien a ziskenn brema var an douar i
 Al listri a ia kuit da sklerder al loar
 O dirok var zu ar c'hreizteiz zo troet
 En eur gas var ar mor ar C'helled divroet...

II

Etre kerrek Penmarc'h, 'tre Roazon ha Naoned
 Hag e kreiz ar c'hoajou, tud a zo dastumet :
 An dud-ze zo deuet euz a Geumri. Breman
 Ez int prest da zevel da viken ar vro-man
 Ho Breiz, ho broik vad, douar an dero braz,
 Bro a bado betek ma pado Beg ar Raz !

Mez sethu hon sent koz a zired bete Vreiz
 Da brezeg en hano Doue d'emp ar gwir Feiz :
 Tud kalonek, kuitet ho peuz hoc'h Iverzon
 Da zoned er c'hoajou etre Brest ha Roazon
 E lec'h feiz an Drouized zo chomet bepred beo...
 Klevit : e Breiz-Vihan sethu trouz an hekleo
 A lavar aliez meuleudi ar Zalver :
 En dro d'ar manati, e peb lec'h, e kaver
 Parkou, prajou, digant ar Venec'h digoret...
 Mez eun den a lavar du-hont « Breizad bepred ! »
 Me hen anavez mad : sethu Nomenoe !
 Etresek an den-ze ar Vreiziz a droe
 Var eun dro o zellou en eur c'houlenn gantan
 Da ziuoall o ziez, o madou dioc'h an tan
 Enaouet e pep lec'h gant an enebourien...

Var m'ez ar stourm, potred, nag a vrezelourien !
 Ar c'hlezeier a sko : an enebour a dec'h
 Hag ar Vreiziz a zav o c'halonou d'an nec'h
 En eur drugarekat Doue Holl C'halloudek :
 Enoromp, enoromp ar Roue kalonek
 An Duk Nomenoe, Tad hor Broik karet
 Ha var ar memez tro, kriomp : Breiziz bepred ! »

Gouenn ar C'helled, varlerc'h, epad nao c'hant blavez
 A vir he nerz dispar, he gizioù hag he iez

En eur vond koulskoude gant an hent hir ha striz
 Ar C'helled a c'houzarv meur a wech poaniou kriz :
 Adalek ar C'hreizteiz beteg an Hanter-noz
 Iverzon a blega dindan galloud ar Saoz...
 Me a wel he mibien a ia kuit divroet
 Beteg an Amerik da glask o zammik boed ;
 Hint a zavo du-hont eun Iverzon nevez
 Lec'h a vezo komzet da virviken o iez !

Ho Preiz a ouel brema d'he frankizioù kollet
 Mez hor gouenn koz a chom atao ar ouenn kaled.

Potred a Vreiz-Vihan ha potred Bro-Geumri
 A varv dre holl bemdeiz da zifenn o mistri.
 Me ho salud, Kelted, dreist-holl c'houi tud a vor,
 Kelted euz a Vreiz-Veur ha c'houi, Kelted Arvor !

III

Sellit, sellit breman : hor gouenn n'eo ket maro ;
 Ar C'helled en Kerdiz a zired var eun dro :
 En eur zal vraz, du-hont, sethu ugent mil den
 A zo deuet, renet gant sked o stereden ;

Hor gouenn he deuz miret daoust d'an amzeriou fall
 An diou loden euz ar c'hleze rannet gwechall ;
 An daou damzo staget an eil ouz egile.
 Bez laouen, bez laouen, Bro-Geltia a ouele !
 Selaouit : ar C'heltes a gan brema 'n eur vouez.
 Teneret a vije kalon al loened gouez !...

Dublin ha Kernarvon a zigemer d'o zro
 Gouenn ar C'heltes deuet deuz a bep korn ar Vro.
 Hirie tavit, evned ! Hirie tavit, steriou !
 Kanaouen ar C'heltes, a nij dreist d'ar moriou !
 Kerzit, moueziou sklentin, bete penn all ar bed !

Ia, houma chom atao ar ouenn nerzuz meurbed !
 Ar boblou a varvo diskaret gant kozni :
 O broiou a zeuio d'o zro hor broiou-ni.
 Breman ar boblou all n'o deuz mui bugale
 Mez ar C'heltes iaouank a gresko hep dale ;
 Ar re-ze gemero patron dioc'h o zadou ;
 Hon Doue a skuillo varnezo e vadou
 'N eur lavaret d'ezo : « Bevit holl hep anken
 Rag ho kouenn hag ho Pro a bado da viken ! »

Kergoadik, Kemper.

AR BARZ MELEN.

Keuden Arzur III Richemont

KONNETABL A FRANZ

Duk a Vreiz

Arzur a oa ganet en kastell Suscinio. Bêg-douar Rhuys, kichen Gwened, er bloavez 1393. Mab e oa da Ian Pevare lezhanyet ar C'honkerer, pehini a drec'haz var Charlez Bleiz hag a oa laket da Bennrener Breiz-Vihan.

Arzur a oa skoliatet en Gwened, ac'hano a ieaz da Naoned.

Pa zeuaz Herri Pemp, roue Bro-Saoz, da vrezelli diouz Bro-C'hall, Arzur a vodaz eur gompagnunez Bretoned, hag a ieaz da zikour ar C'hallaoued. En emgann Azincourt, en 1415 e oa darbed d'ezan koll e vuez. tapet e oa prizonier, ha kaset 6 vloaz da eur vac'h en Bro-Saoz. Pa zizroaz ac'hano, e oa kresket c'hoaz e gasoni evid ar Saozon.

Er bloavez 1424, Roue Franz Charlez Seiz a reaz d'ezan ar C'hleze a Gonnetabl, hag a reaz outan jeneral braz e holl arme.

Richemont, pa glevaz kelou deuz Janed Ark, a ieaz tressek d'ezan gant eur c'horf a Vretoned, hag a zikouraz anezi da billat ar Saozon en Patay.

Pa oa tapet Janed Ark en Compiègne gant ar Saozon, ha devet beo, Richemont a zalc'haz ar brezel. Ar Saozon a oa mestr var Bariz, dilemmel a reaz Pariz diganto, hag e tigasaz ar roue var e giz.

D'ezan e tle ar Fransijen kaout eun arme renket. En Breiz, e savaz ive eun arme soudarded hag a reat ar c'horfou mad anezo.

Er bloavez 1450, ar C'hallaoued o doa ataket ar Saozon en Formigny : Ar Saozon a iea an trec'h ganto, ken a erruaz Arzur gant 2.000 Breizad, hag a c'honeaz ar viktor.

Er bloavez 1457, e niz Per Daou, duk Breiz, o veza marvet heb bugale, Richemont a oa laket d'ezan ar Gurunen Duk, ha hanvet Arzur Tri.

Ne chomaz Duk nemed 15 miz. Mervel a reaz er bloavez 1458, d'an oad a 66 bloaz. Interet eo bet en Naoned.

D'an den brudet-ze eo a zo bet savet eur skeuden-var-

varc'h kaër kenan var dachen Ti-Kear Gwened, an 21 hag an 22 a viz Here.

Var digarez ar savidigez-ze, a zo bet eno goueliou kaër, troet var zu enori Breiz-Izel. An Ao. 'N Eskop Touchet an neuz kontet buez Richemont en Iliz-Veur. Prezegennou o deuz great an AA. Riou, senatour-maer, Lanjuinais, kannad ; gwerziou en enor d'Arzur III a oa bet savet gant Botrel,



Taldir, Herrieu, Lantivy, an abad Lefranc, etc. D'ar sul 22, goude kreizde, Paotred Plevigner o deuz c'hoariet, dindan ar c'hohi, pejou brezonek great gant Job er Glean.

Eur bern dimezelled deuz kear hag an dro, gwisket gantê gwiskamant ar Vretonezed, a werze er c'heid-ze c'hoariellou en gonedigez ar beorien.

D'an noz, zo bet eur pred braz en Ti-Kear, evit kloza ar goueliou breton-ze, hag a chomo pell ar sonj anezo e-touez ar gwir Vreiziz.

NOUELOU BREZONEK

Hon Moullerez a ia da voulla eul leorik *Kanaouen nou Nedetek* euz ar brava, evid ad-digas c'hoaz e-mesk hon broiz ar c'hiz da gana Nouelou evel gwech-all.

Al leorik a vezo goulernet evitan aotreadur Aotrou Eskop Kemper.

Pedi a reomp hon mignoned d'hon sikour da skign al leorik mad ze en eur brena beb a doulladik diganeomp da rei en dro d'ezo.

Al Leorik : 2 wennek.

An Dousen : 4 real.

Ar C'hant : 8 lur.

(Ar c'has ent tu all).

Prest a vezo an *Nouvelou* a-benn penr-kenta miz Kerzu.

Paëroniez "AR VRO"

An Aotrou 'N Eskop DUBOURG. — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON. — An Aotrou Kannad LAMY. — An Aotrou Kannad HEMÓN. — An Aotrou Markiz FREDERIK A GEROUARTZ. — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, "AB GWILLERM" — An Itron Enorus MOSHER. — An Itron Enorus ANNA A GERVENOÆEL.

HANOIOU SKRIVANIERIEN "AR VRO"

Iez Gwened. — Blei Lannvau. — Bleimor. — Kelen Glaz. — Efflam Koet-Skau. — Job en Drouz-Vor. — Loeiz Herriou (Barh labourer). — Pengleuik.

Iez K. L. T. — Jos Albaret. — An Arc'hantek. — Armel. — Ar Berr (Abalor). — Bruk. — Ar Bruger. — Charlez Ar Braz. — Barz ar Blawez. — (ar Yeodet) Bocher. — Biler (Azenor). — Berthou (Alc'houeder). — Barzik Kerglaz. — Ar C'hozik. — Ar C'horfek. — Ar C'harget. — An Du. — Evnik Arvor. — Esnault. — Even. — Ian Ar Fustek. — Ar Furcher. — Ar Garrek. — Ar Goffik. — Ar Gall. — — Ar Gak. — Godest. — Gwennou. — H. Gwillerm. — Gouriou. — Glazardik ar Bod-dero. — Leon Ar Gourenner. — Efflam An Henoret. — Jaffrennou (Taldir). — Kerniliz. — Lunedek. — Laouik. — Meriadek. — Ar May. — L. Ar Menn. — Ian Naden. — Orain. — Pennhouarn. — Ch. Picquenard (Barz Melen). — F. R. Plouescat. — Loiz Porzikel. — Potr Ar C'hap. — Klaoda Ar Prat. — Per Pronost (Barz Treflez). — J. Ar Pelleter. — Iouen Poullan. — Renan Ar Rouz. — Jord'Ar Rumeur (Mathaliz). — Ian Roudot (Mel-oc'h-dir). — Erwan Sebillot. — Ar Sevellek. — Tiercelin.

MOULLEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENNOU E KERAËZ (Penn ar Bed)

Le Gérant: Etienne JACQ.

Les Imprimeurs :
Le Gouziou-Jaffrennou